



«...La langue bretonne reste pour les Bretons la langue de l'âme et du cœur, l'expression de tout un passé qu'ils portent en eux...»

An ao FAUVEL,
Eskob Kemper ha Leon.

K R O A BREIZ

NIVERENN 20

NEDELEC 1949

PRIZ : 35 100

Ar brezoneg
"yez hon tadou"
 er skoliou !

**Gant al levr nevez
 sklaer, ijinus, aes da gelenn**
 savet gant an Ao. Seité ha Stephan

ha meulet gant :

An Ao Kardinal : **Roques**
 Ao'n Eskob : **Fauvel**
 Ao'n Eskob : **Coupel**
 Ao'n Eskob : **Le Bellec**

"YEZ HON TADOU"

(eul levr ar 192 pajenn)

Priz eur skouerenn : **345** lur
 Dre zek » : **335** ar pezh
 Dre ugent » : **325** ar pezh
 Dre hanter-kant : **310** ar pezh
 Dre gant » : **300** ar pezh
 hag ar mizou kas

e gwerz e ti ar BALB — B. P. 108 Rennes
 C. C. P. 1171-35 - S^{te} ar BALB, 8, rue Legraverend, RENNES

133639

KROAZ-BREIZ

KERZU

NIV. 20

PRIZIOU :

Koumanant ordinal (eur bloaz) **350** lur
 Koumanant a zikour..... **500** lur
 Koumanant a enor..... **800** lur

1. Evit kement a zell ouz danvez-skrid ar gelaouenn : skriva da rener Kroaz Breiz : Mr l'abbé Jean-François Falc'hun, professeur au Grand Séminaire de Quimper (Finistère).

2. Evit kement a zell ouz Koumanantou ha profou, skriva da : Mr l'abbé Laurent Bleunven, recteur, Plomelin, par Quimper, (Finistère). C. C. P. 1266.53 Rennes.

**Kroaz Breiz a het eur bloavez mat
 d'he holl lennerien a bep stad,
 d'he c'henlabourerien,
 skrivagnerien, bruderien :
 ra gouezo, puilh, bennoz Doue,
 kouls war o c'horf hag o ene !**

BIBLIOTHEQUE
 QUIMPER
 DIOCESAINE

TAOLENN

Bleun-Brug	Pajenn	2
Penaos displega Nedeleg d'ar vugale (Kl. Ar Falc'hun) ..	—	3
Goueliou ar miz (An Tad)	—	7
Eun tenn fuzul-burzudus (Paotr Treourel)	—	8
Gwenaela (Wanaig)	—	10
Gwechall e Kerwenn : Gouel-Granch (H. Greff)	—	14
Prezegenn-vurzudus Person Sant Keg	—	16
Nedeleg Yannig ar C'hornandon (Yann Gorrigant)	—	18
Nedeleg e Belleem (Per Guichou)	—	20
Sant Loeiz-Vari a Vonfort (Y. Tranvouez)	—	23
Eur brezoneger ha n'eo ket eus Breiz (Abvaodez)	—	26
An ofizer Alaman	—	27
Tenzor an dindin goz (Ab Sulio)	—	28
C'hoariou	—	30
An Azvent	—	g. 4

REVUE MENSUELLE

Ar merour : M. l'abbé BLEUNVEN
 Recteur, PLOMELIN, par Quimper

Ti-Moulererz Kreiz Breiz
 36, Rue Richard-Lenoir, RENNES

LIZER KUZUL-MEUR AR BLEUN-BRUG d'Ar Vretoned

Ganet eo bet ar Bleun-Brug e 1905. Anaout a rit e amzer dremenet. Breman eo ret deomp sellet ouz an amzer da zont.

Hon daou Gendalc'h diweza a zo bet daou daol kaer, en despet d'an diaesteriou a bep seurt ha d'an dismegans a zo bet klasket teurel war holl draou Breiz ha war labour an Aotrou Perrot.

Goude Bleun-Brug kaer Kastell-Paol 1948, hon eus anavezet Bleun-Brug dispar Lokronan 1949.

Peure'hraet eo, evit mat, an emgleo en dro d'ar Bleun-Brug, er-maez a bep politikerezh. Hor youl eo miret Breiz en he c'haer gant he holl finvidigezioù, ha dreist-holl he yez, dindan gwarez hor pemp Eskob doujet. Ha kredi start a reomp, en eur ober evelse, labourat evit mad ar bed, rak, evel ma lavar hon eskob karet an Ao. Fauvel, « eur bobl hag a gresk he fersonelez a bindidika ar bed ».

Breman eo ret deomp mont war-raok! Evit se avat, kousto pe gousto, e rankimp kaout ARCHANT ha TUD.

Ar Bleun-Brug ne dle ket beza hepken eur gouel bloaveziek, met eur gevredigezh veo. Kaout a rank evit se eur sekretour da badout. Kavet eo ar sekretour-ze: Visant Seite eus Treboul an hini eo, ha votet eo bet dez an ar c'hant ret evit padout.

Kavout a rankimp ivez eur C'HANNAD e pep kanton, e pep parrez, hag a vodo en dro dez an MIGNONED ar BLEUN-BRUG, « ar VRUGER-RIEN », a glasko deomp izili, a genskrivo ganeomp evit kement tra a zell ouz buhez Breiz.

« Kroaz Breiz » a vo hor c'helaouenn: dreizi e roimp da glevat hor mouez. Evit ar Vrugerien, e c'hellimp moula eur c'hannadig bep an amzer.

Lakaat a raimp hor strolladoù Bleun-Brugerien da labourat: yez, istor, c'hoariva, lennegezh, diskoñezadegoù ha kenstrivadegoù... a vo danvezioù founnus kinniget dezo.

1950 a vo eur « Bloavezh santel ». Evitan e savimp eur Bleun-Brug santel war an danvez-man: sent Breiz-Vihan ha Breiz-Veur. E Kastell-Paol, kêr-veur unan eus hor Seiz Sant, eo e vo graet ar gouel. Fellout a ra deomp e ve ar gouel-ze Bleun-Brug ar ZENT, Bleun-Brug an holl VRETONED, e lec'h ma skedo kaer hor Breiz kristen.

Evit-se, roit deomp ho skoazell. Labourit ganeomp!

Evit kuzul-meur ar Bleun-Brug,
Ar penn-rener : Dr LIBERAL.

EVIT BEZA EZEL EUS AR BLEUN-BRUG :

Petra da ober ?

Kas ar skodenn :

Ar skodenn a 200 lur a ra beza : ezel ordinal ;

Ar skodenn a 500 lur : ezel a enor ;

Hag ar skoden a 1000 lur (pe ouspenn) : ezel madoberour.

Gant ar gartenn a enor pe a vadoberour e c'heller kemeret perzh evit netra e holl c'hoariadegoù kendalc'h ar Bleun-Brug, evit ar bloaz.

Kasit diwar vreman ho skodenn da : V. SEITE, Bleun-Brug, Treboul (Finistère), C.C.P. 544-22 Nantes,

pe grit degemer mat d'an hini a yafe d'ho kaout eus hor perzh.

Kerkent ha resevet hoc'h arc'hant e vezo kaset deoc'h pe roet eur gartenn hervez ho skodenn.

Kenvroad ker, deuit davedomp, hag a-gevret e raimp labour dispar evit Breiz hag hor Yez karet.

PENAO'S DISPLEGA NEDELEG d'ar vugale

(Kl. ar Falc'hun)



Ar skrid-mañ, embannet da genta e galleg, er gelaouenn « En chrétienté » (mouladur evit ar maezioù, here-kerzu 1949, p. 3-6), a zo bet skrivet gant eur beleg eus eskobti Kemper, karget eus an holl vugale a vev war ar maezioù e Bro-C'hall. Abaoe, al labour a zo bet troet dija e yezou ar Broioù-izel, en Alamagn hag Italia, ar pezh a ziskouez e dalvoudegezh. An oberour a ginnig gant plijadur e zontjou d'an holl gerent ha mistri karget e Breiz da zigeri sperejou ar vugale d'ar C'hrist. Bennoz Doue dezani !

« Petra eo anaout Hor Zalver Jezuz-Krist nemet gouzout eo diskennet Doue etrezek e grouadurien evit o lakaat tostoc'h outañ eget ma oant evel krouadurien, o finvidikaat gant eun donezon divent, hag en dizro birvidikaat o c'harrantez evitañ. » (T. Montcheuil, *Leçons sur le Christ*, p. 52.)

Ma sellomp ouz gouel Nedeleg dindan ar sklerijenn-ze, ec'h aňzavimp eo eur gouel eus ar re binvidika. Aňzav a raimp ive ne vez ket graet o dever ouz ar vugale war gement-se, dre ma ne lavarer ket dezo ar pezh a rafe dezo anaout mat talvoudegezh Nedeleg.

1) E-TOUEZ AN DUD DIGRISTEN

Pa ne c'hellent ket stanka hent an eneou da gement trouz a deu eus Nedeleg, an dud digristen o deus poaniet da zistresa, a nebeudou, ster ar gouel :

— Dalc'het o deus ar gouel a familh, met en eur zacha ar sperejou etrezek askoan-Nedeleg hepken ; alies an askoan-ze a deu da veza eur pred-lonka, a vez dispignet ennañ, gant eur c'hoarz pounner, milurioù ha dek-milurioù. Ha d'ar mare-ze ez eus tud o vervel gant an naon !

— Roet e vez c'hoaz madigoù ha braoigoù d'ar vugale : bez' e tlefeñt merka an donezon graet gant Doue eus e Vab d'an dud, hag al levezon en deus ar bed dre ma teu dezani eun dasprener, dreist-holl p'eo an dasprener-ze ar C'hrist... Bremañ ar madigoù a deu atao, met degaset gant eur paotr-koz, ar « Père Noël », ar paian a gemer plas ar C'hrist.

— Evit ar gristenien, gouel Nedeleg a zo diazezet war eun darvoud a zigouezas e gwirionez : e Betleem, ginivelez ar Mabig Jezuz, gortozet abaoe keit amzer... Petra ra bremañ hor paianed nemet konta an istor-ze evel eun istor gornandoned, savet dre faltazi, ha plijus evel an holl gontadennoù bugale ? — Penao's e c'hello neuze ar bugel kenderc'hel da gredi er C'hrist, pa vo deuet dezani dizale ar mare da zilezel an istorioù kornandoned ?

2) E-TOUEZ AR GRISTENIEN

Gant ar re-mañ, gouel Nedeleg n'eo ket heñvel, a drugare Doue.

Kontet e vo d'ar vugale beaj Jozef ha Mari eus Nazaret da Vtleem; an nof serret en ostaliri; an Aelez oc'h en em ziskouez d'ar Vesaerien; levezet ar Vesaerien; displeget e vo ive penaos e teuas betek ar C'hraou, ar Vesaerien hag ar Roueed-Vaj; penaos e voe lazet an Inosanted santel, ha penaos e tec'has ar Familh zantel betek en Ejipt.

Kement-mañ a zo mat!

N'eo ket awalc'h koulskoude.

— Re alies, ne vez ket staget awalc'h an istor ouz an traou beo; implij a reer re a deneridigez, a liviou kaer, a voumounou! Ne vo ano nemet eus ar « Mabig Jezuz », hap lavaret e teulio ar bugel-ze da veza bras, hag e varvo eun deiz war ar groaz, hag e savo leun a vuhez eus ar bez... Dre-ze, ne vez ket digoret sperejou ar vugale da gredi e mister an Doue-den, ar C'hrist: ha koulskoude, hennez eo ar mister o deus poan o kredi.

— Moarvat, ne vez ket, kennebeut, displeget awalc'h d'ar vugale perak e oa laouen ar Vesaerien. Ar vugale a wel en dro dezo ar familhou el levezet pa vez ganet eur bugel, an amezeien o tont d'e welet hag o kinnig profou, dilhajou, gloan, kouignou... Daoust ha levezet ar Vesaerien ne vo ket kemeret gant hor bugale evel hini ar familhou-ze?

— Ha lavaret e vez dezo awalc'h perak e teuas ar Roueed-Vaj, perak o deus poaniet kement e Jeruzalem o klask ar Bugel hag e voent ken laouen o tegouezout e Betleem?... Daoust hag hor bugale ne welont ket bremañ alies an dud oc'h ober beajou hir da geñver ar ganedigezioù? Beaj ar Vajed a c'hellfe beza komprenet evel unan eus ar beajou-ze!

— Ha dispaket e vez d'ar vugale perak eo laouen an Iliz da Nedeleg? Alies, al levezet-se n'eo evito nemet eul levezet evit ar pezh a zo bet tremenet gwechall, evel d'ar 14 a viz gouere, pe d'an 11 a viz du... An Iliz koulskoude a zo laouen ivez abalamour ma tizroio ar C'hrist da fin ar bed, ha ma c'han bemdez bremañ en enecou dre ar vedeziat.

E berr gomzou, Nedeleg a jom re alies eun eñvor eus an amzer dremenet, eur gouel a levezet evit ar familh, ha ne zegas netra d'ar bugel evit e amzer da zont.

Kement-se a zo fall: rak en ano ar gwirionezioù mac'hagnet-se, ha re all heñvel, eo e vo goulenet diwezatac'h ouz ar vugale en em rei a leun d'ar C'hrist ha beva a grenn evit Doue. D'ar mare-ze koulskoude e vo tud all o kinnig dezo eun hent trelatus ha nerzus, herr gantañ etrezek an amzer da zont! Hag ar bugel a oar sellet peil en e raok!

Ret eo, en deiz hirio muioc'h eget biskoaz, displega Nedeleg d'ar vugale en eun doare kristen rik; hag aliesoc'h-alies a ne gavint ket, siouaz, kement-se en o c'hêr.

1) RET EO, DA GENTA, ENEBI OUZ AN DOAREOU A-DREUZ

— Arabat morse gouzañv ar « Père Noël » e buhez ar vugale. Deomp eo da gaout nerz awalc'h evit diskouez hor c'hredennou diwar e benn, hag evelse e kavimp tro da zisplega ar mister e gwirionez. Meur a hini ne blijjo ket dezo hor c'homzou! Met daoust ha gwir hon eus da c'houzañv eun hanter-gaou, arvarus evit feiz hor bugale? Na argilomp ket da ziskuilh sklaer ar gaou a zo en istor baian-ze ha n'he deus netra da welet gant ginivelez ar C'hrist.

— Diskouezomp *madigou Nedeleg* evit ar pezh ma 'z int: ar gerent a lavaro e talc'hont plas an Aotrou Doue, hag e reont ar blijadur-ze d'o bugale en ano Jezuz, en eñvor eus e c'hinivelez. Gwezenn-sapr Nedeleg, ar boutelier er siminal, ya! an traou-ze a ray vat d'ar vugale dre ma vo laketa en dro dezo ar mister hag ar Gouel.

— Diskouezomp d'ar vugale n'eo *askoan-Nedeleg* nemet eun doare da veva er familh, unanet en dro d'an daol, al levezet a dle beza dre an Iliz a-bez, dieubet ma 'z eo gant ar C'hrist... Nedeleg n'eo ket lidet abalamour d'an askoan, hag houmañ n'eo nemet lodenn-c'houel ar familh. Ret e vo neuze eta kaout soñj eus ar beorien, digeri ar familh d'an dud reuzeudik, dreist-holl d'ar re a vev o-unanik-penn: e giz all, an askoan n'eo nemet lonkerez hag emgarantez direol.

2) RET EO GOUDEZE DISPLEGA NEDELEG EN EUN DOARE KRISTEN

A) Da genta, lavaret *pehni eo plas Nedeleg e istor ar bed*; diskouez pegen beo ha talvoudus eo evit ar bed a-viskoaz. An anaoudegez-mañ avat ne vo roet nemet dre hir amzer, a nebeudou: epad miz kerzu, ar vugale a zo digor bras o spered d'ar wirionez-se a zach kement o zoñjou.

Eul labour eo da ober etre ar gerent, ar veleien, ar gatekizerien, ar vistri, an holl dud a ra wardro ar vugale. An aesa eo displega ar wirionez en eun doare beo, dre istoriou, kanaouennou. Arabat kaout c'hoant da zisplega an holl draou: ar gwirionezioù brasa hepken, da skouer:

— Stad reuzeudik Adam hag Eva, a nac'h o c'harantez da Zoue, hag a goll evelse an Eurusted evito hag evidomp-ni d'o heul: pellaat a reont evelse diouz Doue, ha ni gantho.

— Ar Juzevien hag ar bed holl enkrezet o c'hortoz ar Meziad, ar Zalver. Doue, o welet ar poblou o trei etrezek er fals-doueoù, a gemer eur bobl evitan e-unan: hini ar Juzevien, bugale Abraham. Distaga a ra ar bob-ze diouz ar re all, hag enezi eo e lakaio genel ar Zalver.

— An amzer ziaes a zeu neuze evit pobl Doue: dispac'h, teñvalijenn... Niver an dud diskredik a gresk etouez ar Juzevien dre re hir c'hortoz. Doue koulskoude a daol evez ouz e bobl: degas a ra dezi tud a galon. Amañ e vo gellat kemeret skouerioù en istor-zakr: hini ar vamm hag he seiz mab a varv er verzerenti kentoc'h eget dizenti ouz lezenn Doue... hini ar Brofeted, sklerijennet gant Doue, hag a ro buhez hep ehan da dan an esperañs: plijout a ray d'ar vugale klévet penaos e voe galvet ar profed Izaia hag Doue.

Seulvui e vo roet da zantout d'ar vugale pegen ankeniet oa ar bed araok ma teuas ar Zalver, seulvuoc'h e saourint ouz levezet Nedeleg.

B) *Diazeza mat feiz ar vugale.*

Ret eo e kredfe ar bugel eo gwirion ginivelez Nedeleg. Diwar goust traouigoù a netra peurliesha eo e vez brallet feiz hor bugale epad o c'hresk. Sellomp eta en hor raok evit enebi ouz ar brall. Diskouezomp sklaer n'eo ket Nedeleg eur gontadenn evel hini « Blanche-Neige » pe ar Gornandoned.

Lakomp ar vugale da studia a-dost da be vare hag e pelec'h eo bet ganet ar C'hrist. Eun dra aes eo: grit dezo tresa eur gartenn eus an Douar zantel, ha merka warni, gant kreñhoù a liou, an hent graet gant Sant Jozef hag ar Werc'hez eus Nazaret betek Jeruzalem ha Betleem. Gant sikour ar c'hoarioù e c'heller ivez o lakaat da zeski mat peur eo ganet ar Zalver.

C) *Ret sked d'ar gredenn-mañ: ez eo ar C'hrist Mab-Doue.*

Er C'hraouig e seblant Jezuz beza ken dister, ken paour, m'emeur er riskl da ziskouez an doareou dister-ze hepken d'ar vugale; ha pa vo deuet bras ar re-mañ, e c'hoarzfe da veza kredet gwechall er « Mabig Jezuz ».

Lavaromp dezo eta e teulio ar Bugel-ze da veza bras, e sach'o ar poblou d'e heul; lavaromp dezo dreist-holl ez eo Doue, Holl-C'halloudek, ha n'en deus kemeret eun doare ken dister nemet abalamour d'e garantez divent en hor c'heñver, evit beza tostoc'h ouzomp.

D) *Diskouez Nedeleg evel eur mister a vremañ.*

Levezet Nedeleg ne deu ket deomp hepken eus eñvor an amzer dremenet: laouen omp dreist-holl abalamour ma ouzomp ervat ez omp salvet, dasprenet.

— Dre-ze, lakomp sperejou ar vugale war ar gortoz ; diwallomp avat e c'hedfent eul levenez hag a c'hellfent « santout », rak en arvar e vefent neuze da gaout eun dizouezenn boanuis.


— Met sikouromp anezo da gaout eul levenez doun : ra vezint laouen eus o madelez o-unan, eus ar zervij o do roet en dro dezo, eus ar blijadur o do graet d'ar re all.

— Deskomp d'ar bugel eo dezañ da aoza gouel Nedeleg evitañ e-unan : greomp fiziañs d'e volonteiz vat ; diskouezomp dezañ penaos e tle poania, dre « garantez » : evel ma kempenner ar C'hraouig en iliz, evelse pep den a dle beza, da zeiz Nedeleg, ur C'hraouig beo, tommet gant tan ar garantez...

— Deskomp ivez d'ar vugale e tleont beza kannaded ar c'helou mat degaset gant ar C'hrist, kelou ar garantez, ha klask beza kement-se dre o doare da veva, en o familhou, en o farrezioù : klask a-unan ganto er barrez pere eo an dud n'o devezo ket da zeiz Nedeleg, levenez a familh ebet (bugale emzivat, tud koz...), hag o degas d'ober eun dra bennak evit ar re-ze (o fedo ouz taol ar familh deiz ar gouel, kas dezo eur pakadig, hag all...).

Evelse eo e c'hell ar vugale beva e gwirionez eus gouel Nedeleg, hag e teuo Ginivez ar C'hrist da veza evito eun nerz evit bremañ hag evit o amzer da zont.

KL. AR FALCHUN,
eil-ahuzenner vroadel an Y.K.A.M.



Da zeiz Nedeleg ar c'hleier a vrallo !...

★ GOUELIOU AR MIZ ★

2 kerzu : gwener kenta ar miz.

Kalon-Zakr Jezuz, ho pet truez ouzomp !

4 kerzu : eil sul an Azvent.

« Daoust ha c'houl eo an Hini a dle dont ?... » Ya ! Jezuz eo an Hini a dle dont d'hor zavetel. Dont a raio da geñver gouel Nedeleg, met dont a ra, ouspenn bemdez, betek ennomp dre an holl c'hraou a ro deomp, dre ar soñjou mat a laka en hor spered, dre ar c'hraou zoken a ro deomp da zougen evit rei tu deomp da c'hounit meritou evit ar baradoz. Soñjomp ervat e kement-se ha bezomp atao diskibien vat dezañ.

8 kerzu, yaou : gouel ar Werc'hez Vari kofsevet hep pec'hed.

A-unan gant an Archel Gabriel, saludomp hor Mamm eus ar baradoz ; kasomp dezi meuleudioù leun a zoujañs hag a garantez : « Ni ho salud, Mari, leun a c'hraou... ». En he enor, deomp holl da zakramanti. Er bloaz-mañ, bloaz an Itron Varia, poaniomp da greski ar plas a reomp d'ar Werc'hez en hor buhez.

11 kerzu : trede sul an Azvent.

« Bezit bepred laouen gant Doue. » Setu komzou ar Spered Santel lavaret deomp hirio, en abostol. Laouen abalamour ma teu deomp ar Zalver dizale, ha ma teuo da fin ar bed da lakaat pep tra en e renk. Mat ez a ar vuhez evidomp ? Bezomp laouen, rak Doue a zo o rei deomp perz en e vuhez a levenez... Kalet eo ar groaz war hor skoaz ? Bezomp laouen ivez, rak bez' ez eo ar groaz dibabet evidomp gant hon Tad karantezus, evit hor mad gwirion hag e vrasa gloar.

17 kerzu, sadorn : Sant Judikael, roue Breiz.

Eur mignon bras da Zoue, eun den madeleus e keñver an holl, dreist-holl e keñver ar beorien hag ar glañvourien, — eur breizad kalonek ha dispart : eur skouer evit pep hini ac'hanomp !

18 kerzu : pevare sul an Azvent.

« Kempennit an hent d'an Aotrou » Pa deu ar C'hrist war hon henchou,

da zul ar Zakramant, e kempennomp evitañ eun hent a enor... Emañ o tont adarre davedomp da Nedeleg, dre e Zakramant : chom a raio ganeomp dre nerz burzudus ar c'hraou hag e vevo kuzet en hon eneoù gant an Tad hag ar Spered santel. Kempennomp mat dezañ hent hon ene dre eur wir bini-jenn, keuz d'hor pec'hajoù ha youl da ren eur vuhez santeloc'h hervez e goulou.

25 kerzu, sul : gouel Nedeleg.

« Hag ar Verb a zo en em c'hraet den... » Daoulinet dirak kraouig Betleem, adoromp, meulomp, kanomp Mab-Doue diskennet eus an neñv war an douar-mañ evit hor zavetel. Gwelomp ha beva a reomp evel tud salvet gantañ, da lavaret eo evel tud hag o deus kavet a nevez karantez an Aotrou Doue hag an nesa ? Daoust ha n'omp ket mui sklavourien ? Bez' ez omp, ma vevomp evel ar baianed, hervez lezennou ha n'int ket re hor Mestr.

26 kerzu, lun : gouel Sant Stefan, kenta merzer.

An avieler kalonek ma voe Sant Stefan eo a roas da genta da Zoue testi bras ar garantez en eur skuilh e wad evitañ ; kals re all a zo bet galvet abaoe da heuilh e skouer, zoken en hon amzer... Holl omp karget gant Doue da veza e destou war an douar-mañ, peurliesha en eur rei hor buhez tamm-ha-tamm evitañ. Sellomp ouz hon doare da veva, d'en em zispign e servij Doue hag an dud : eun testi eo eus karantez Doue, pe eun disme-gañs evit e ano ?

31 kerzu, sadorn : an deiz diweza eus ar bloaz.

Eur bloaz all tremenet, unan eus ar re a vo roet deomp gant Doue evit mont etrezek ennañ, ma ouezomp senti mat ouz ar stur. Eur zell en adrefij : eeun eo bet an eor graet er bloaz-mañ ? Eur zell en araok : petra a rin er bloaz a zeu evit tostaat ouz Doue ? Tad holl-c'halloudek, roit din ar c'hraou da dremen eur bloavezh mat ouz ho meuli hag ho servija.

AN TAD.

EUN TENN-FUZUL BURZUDUS

Gant Paotr TREOURE



En amzer an Napoleon koz, tri ja-seour diwar dro Kemper a oa bodet e tal an tan o konta o zaoliou kaera a jase, da c'headal ar glao da ehana. Unan anezo a leze ar re all da jao-gat, hep ranna ger.

Abarz ar fin, koulskoude, e lavaras : « Me 'm eus graet kaeroc'h. Met c'houi ne gredot ket ac'hanoun !... »

— Perak 'ta ? emezo. Kont atao da istor, ma vo gwelet...

— Alo ! Deomp ! » eme Jobig.

Araok an Dispac'h bras, adalek va daouzek vloaz, me oa floc'hig, da lavaret eo mevel bihan gant eur Markiz. Va c'herent a oa merourien dezañ, setu m'en doa goulennet ac'hanoun da vont d'e zervija kerrent ha na oan gouest d'ober eun dra bennak.

Ar Markiz, paotr yaouank koz, chentil awalch, met eun tammig drol, a oa o chom en eur maner koz, e unan-penn. Daoust m'oa pinvidik-mor, ne roe ket kals a dra din evit va c'houmanant : va dilhad hepken, er penn kenta ha pa voen savet brasoc'h, eul loeiz aour bep bloaz.

N'am boa ket kals a dra d'ober ken-nebeut : kempenn an ti, aoza boued, d'an aotrou ha d'e jas, ha mont d'e heul war droad awechou pa 'z ae heñ war varc'h betek ar gêr vras da ger-c'het arc'hant, atao eur fuzul ouz e skoaz.

O ! Pebez fuzul gaer ! Lintrus evel an heol ! Me 'm bije roet n'ouzon ket petra evit gellout he dornata : leun a imajou kizellet warni ! Met an Aotrou ne ziskroge ket eus e fuzul. Ha, souezusa 'zo, morse ne denne ganti. Ken alies ha bemdez, pa 'z aemp dre ar maeziou, e kavemp gedon, lapined, ha klujiri. An Aotrou a zave e fuzul hag a vize, met ne denne ket ! Kaer am boa klask gouzout perak, n'oan ket evit kompren.

Eun devez oan bet gantañ er gêr vras hag e oamp diwezat o tistrei d'ar gêr, rak ar marc'h, dishouarnet, a oa kamm-broud.

Deut oa an noz warnomp hag edomp c'hoaz pell diouz ar gêr, o treti eur

c'hoad. An avel a zute etouez ar gwez, ar gaouenn a glevet o yudal.

— Allas ! eme an Aotrou, enkrezet holl war e varc'h kamm, amañ 'z eus dañjer evidomp, paotr kaez !

— Ho fuzul n'eo ket karget ? emeve.

— Eo ! floc'hig, eme ar Markiz, met al laeron awechou a laer ar fuzulioù !

En tu-mañ d'ar c'hoad, e oa o chom, en eun tammig ostaleri, eur breur d'am mamm, tonton Paol.

Erruet dirak an ti, me lavaras d'an Aotrou e vije gwelloc'h deomp marteze chom eno da loja. An Aotrou ne lavaras ket nann, rak acn en doa, ar paour-kaez den !

Ha dao ! Diskennet an Aotrou ; ar marc'h a voe lojet er c'hraou. An Aotrou ha me, pa ne oa na gwele na kambr da rei deomp, a voe lojet er zal vras, an Aotrou war eur gador vourret, ha me war eur gador-golo.

Mouget ar goulou, pep hini a glas-kas an dro da gousket.

Goude hanter-noz, tonton Paol, ar gwella eus an eontred, boaz da vont da jaseal en noz, dre laer, a ziskennas er zal gant e fuzul da baka houldi. Ha pa welas oa kousket c'houek an Aotrou war e gador vourret (roc'hat a rae zoken), e lavaras din-me a vouez izel, rak ne gousken ket :

— Jobig, emezañ, c'hoant az peus da zeski paka ar c'had en he ched ?

— N'am eus fuzul ebet !

— Kemer hini an Aotrou, ma tiver-glo. Ma tennez ganti, m'her c'hargo adarre, ha den ne ouezo netra ! »

Touellet e voen gantañ. Ha me, krog er fuzul gaer : o joa dudius !

Hag hon daou er maez, ker sidul ha tra.

Savet oa al loar. Erruet en trede park en tu all d'an ti, er penn all d'eun dachenn raden, ez ajomp demdost d'eur wezenn dero :

— Taol evez, Job, eme donton Paol, aze emañ-hi !

Eno edo ar c'had, ha dihun, kredit mat. Dizale e voe gwelet dre douez ar raden daou skouarn hir o lammat. Pañ ! Pañ ! Daou den fuzul a grozas asam-

blez, hag ar c'had a jomas war an dachenn.

— Genaouek, eme donton Paol o vont d'he dastum, te 'peus tennet war ar wezenn dero !

Me gave din am boa skoet eeun, met ne greden lavaret seurt.

Distroet d'an ostaleri, adkarget ar fuzul vras, tonton Paol ha me a yeas pep hini d'e lok. An aotrou Markiz a gouske c'houek atao. Me ne zerris ket eul lagad.

Pa deuas an deiz, ar c'had a voe kempennet ha lakaet da boazat, d'ober kig-rost. Ha wardro eiz eur, ar Markiz, dihunet pelloc'h, a dridas e galon pa welas peseur friko a aozed dezañ.

— Penaos az peus paket hounnez ? emezañ d'am zonton.

Siouaz ! Va zonton Paol, eur bra-bañser evel kals a jaseourien, a voe mall gantañ konta penn-da-benn an abadenn. Ne voe ket evit miret da lavaret am boa-me tennet gant ar fuzul gaer... Me oa eno o selaou hag her c'hlevas o lavaret :

— Ya ! Aotrou Markiz, tennet en deus ganti, met evit skei e kichen. Me eo am eus diskaret ar c'had !

— Penaos, forban ? eme ar Markiz o trei ouzin, kounnaret ha drouklivet. Te 'peus tennet gant va fuzul ! Te 'peus tennet gant va fuzul ! Hounnez a oa enni ugent loeiz aour !...

Gwir oa ! An Aotrou, pa 'z ae da droienna, a guze e beziou aour e kanol e fuzul, gant aon rak al laer.

Dioustu am boa kemprenet perak ne denne morse ganti, ha perak he doa bloñset kement va skoaz o tont war

an adrefn p' am boa tennet ganti war ar c'had, ha perak ivez e krede din beza gwelet, e lec'h broulou plom, eur vindrailh alaouret o ruih etouez ar raden.

Ha ker buan all, o kredi n'am boa pardon ebet da c'headal, e klasken gouzout e pelec'h e kavien eul lenn d'en em deurel ebarz, evit beuzi war eun dro va buhez ha va zorfed.

Bennoz da Zoue ! Diarbennet e voen em huñvreou a follentez gant trouz ar peziou aour o tiruilh eus korf ar c'had war an darbod, ha gant mouez va zonton Paol o youc'hal :

— A ! Bremañ e ouezan petra oa ar galedennou a zanten er c'had-mañ ! Aotrou Markiz ! Amañ emaint, ho peziou aour ! Me eo a zo bet ar genaoueg ! Jobig eo en deus lazet ar c'had. Setu aze avat eun tenn a briz : pevar-c'hant lur en aour ! Ar Rouaned ne reont ket seurt taoliou ! »

Ya ! Kredit pe na gredit ket, paotred, an holl beziou aour a voe kavet e relegou ar c'had, dre ma voe dispennet.

— Ne vank hini ebet ?


— Eo ! Unan ! Daou a voe kavet en he fenn araok, seiz en he c'hostou, dek en he divorzed hag en he fenn-adrefn...

Ne vanke nemet unan hag an Aotrou hen dalc'has diwar va c'houmanant.

— Setu aze, paotred, eun istor hag a zo gwir-bater... Ha bremañ p'eo echu ar glao, deomp da welët ha ni a bako eur c'had all, hep ezomm da denna gant peziou aour.

(Hervez Paol Arêñ.)

PAOTR TREOURE.



E TAL AR MOR

GWENAELA

Pezig c'hoari evit merc'hed bihan, tennet diwar eur gontadenn embannet gant OLOLE (niv. 46, 26-10-41).

GWENAELA, e giz eur Vreizadez yaouank eus n'eus fors pe gorn-bro eus Breiz.
AL LEZVAMM, e giz eur vaouez wardro 50 vloaz, gant eur maskl fri-hir.
AR WEZENN, eur verc'h gant eur zae hir-hir; war ar penn ha war an divrec'h, skourrou eur wezenn wir.
AR PUNS, sevel bardell eur puñs gant paper-mein; ar verc'h a vo kuzet en adrefiv, ne vo-gwellet nemet ha fenn a-us d'ar yardell, e kichen ar zailh, staget gant eur jadenn.
AR FORN, Sevel eur forn, gant eun doenn gromm e paper melen; eun nor garrezek er c'hreiz, ma tremeno drezi penn ar verc'hig.
AR VOUEZ, Houmañ ne vez ket gwelet; mouez flour eun den yaouank pe eur plac'h yaouank.
AN DISPLEGEREZ, Gwisket evel eur Vreizadez.

TAOLENN GENTA

E ti Gwenaela : oaled, taol, skinvier hag all...

An displegerez a zo war an draok d'al leurenn. Epad ma komz, e weler war al leurenn-c'hoari :

— Gwenaela o labourat (neza, skuba).

— Gwenaela o vont kuit.

.. Al lezvamm o tont hag o laza an tan gant eur zailhad dour.

— Gwenaela a zistro : gwelet a ra maro an ten; diskouez a ra beza nec'het; sellet a ra dre ar prenestr.

— Kemer a ra eur vantell ha mont er maez.

AN DISPLEGEREZ (gant an ton aratoz : ton-displega a c'hiz koz, pe ton ar c'hoariva boutin). — Eur wech e oa, eur wech ne oa ket hag eur wech e oa bepred. E oa eun den koz hag en doa eur verc'h, Gwenaela he ano. Houmañ a oa eur plac'h ken mat ma vije roet da skouer d'ar yugale all, dek leo tro-dro; ken mat ma oa skrivet he ano er baradoz.

Siouaz, an den koz a eilzimezas, ha setu Gwenaela eul lezvamm dezi. Na gwas tra ! A bennherez karet, eo lakët da vatez gallgaset. Adalek ar mintin betek an noz, n'eus war he lerc'h nemet trouz ha gourdrouz.

Ha koulskoude, hep klemm, Gwenaela a labour : neza, ober tan, poaza boued, skuba, netaat pep tra.

Eun deiz, dallet gant he c'hasoni, al lezvamm a ijinaz leza an tan, an tan hag a dlhe beza dalc'het beo, hep ehan, gant Gwenaela.

D'an deiz warlerc'h, da c'houlou-deiz, ar baourezig-kaez a gav an tan maro. Hag hi gwall nec'het ! Petra da ober ?

Sellet a ra er maez. Daoust ha ne welo ket en eun ti bennak, e kichen, eur siminal o tivogedi, o tiskouez dezi e pelec'h e kavo glaouiadenn evit gellout c'houeza an tan adarre war he oaled ?

Eo ! Gwelet he deus !

Ha setu hi o kuitaat he zi, hag en hent !

EIL TAOLENN

An displegerez a jom bepred war ar rak-leurenn, en tu kleiz.
Kerkent echu ar genta taolenn, gouel al leurenn a gouez.
Neuze e teu war al leurenn, ar wezenn, ar puñs ha gar forn (ma kaver mat e c'heller sevel ar gouel epad ma teuont d'o flas).
Setu doare al leurenn neuze :

Ar wezenn.

Ar puñs.

Ar forn.

An displegerez.

An nor.

AN DISPLEGEREZ. — Mont a ra Gwenaela. Mont a ra. Ha setu, war ribl an hent, eul horz, ennañ gwez kaer.

AR WEZENN. — Gwenaela, Gwenaela ! Deus, plac'hig vat, deus da lemel diwarnoun al loened vil, ar preñved a grign va deliou tener. Anez da ze, penaos o devezo an dud veo eus va frouez, evel er bloavezioù all ?

AN DISPLEGEREZ. — Ha Gwenaela, goude termal eun tammig...

GWENAELA. — Ba ! Ne vin ket pell !

AN DISPLEGEREZ. — Hag hi, d'ar red, da lemel ar preñved diwar an deliou hag ar skourrou, hag o flastra dindan he zreid.

Ha mont a ra. Mont a ra... betek ma tremen e kichen eur puñs, hag e klev :

AR PUNS. — Gwenaela, Gwenaela ! Plac'hig vat, plac'hig tener, setu ma 'z ouñ hanter-vouget, gant al lec'hid. Va dour ken sklaer a zo mastaret. Karz ac'hanoun, hag al lec'hid louz a yelo da heul. An dud paour o devo adarre dour kaer da derri o zec'hed.

AN DISPLEGEREZ. — Mont a rae, Gwenaela... nemet e teuas da zofij dezi eus ar glaskerien bara, ar berc'hirined, an holl dremenidi a gave ken mat eva eur bannac'hig dour eus ar puñs, en eur dremen. Hag hi o senti ouz ar vouez, hag o karza ar puñs... Ha mont a ra. Mont a ra ken ma tigouez dirak eur forn.

AR FORN. — Gwenaela, Gwenaela ! Tenn al ludu a zo o samma va leurenn : ne c'hell ken ar baour-kaez tud poaza o bara !

AN DISPLEGEREZ. — Hirvoudi a na ar plac'hig, ha koulskoude e sent adarre; ha gant ar rozell, setu ma tenn al ludu er maez.

Ha setu hi o vont adarre... hast ganti kaout erfin an ti a oa ennañ an tan beo.

Setu an nor : « Tok ! Tok ! » a ra Gwenaela...

AR VOUEZ (eus an diañvaez). — Piou a zo aze ? Ma 'z out madeleus hag eeun da galon, deus ebarz ! Anez da ze, diwall ! Va c'hiez ruz he deus dent lemm ha skilfou dir, ha bruzuni ac'hanout ne vo ket diaes dezi.

AN DISPLEGEREZ. — E giz-se e komz ar vouez; klevet e vez, ne vez gwelet den !

GWENAELA. — N'ouzoun ket hag eeun eo va c'halon : met, evit beza medeleus, eus va gwella e ran.

AN DISPLEGEREZ. — Hag hi ebarz, hep aon... Goullo e oa an ti, ha skarz et an oaled... Na pebez despët evit ar baourezig Gwenaela ! Setu ma tistro war an treuzioù en eur ouela.

Kement all a hent he devoa graet ! Evit netra.

Kement all a boan he devoa bet ! Evit netra.

Penaos e ray bremañ ? Daoust ha ne vo mui na tan war an oaled, na sklerijenn 'r he zi ?

Neuze ne glêvo mui trouz an dour o vervi !

Nemet mouez al lezvamm griz o tamall, o trouzal hag o klemm-en dro dezi.

Gouela a ra Gwenaela !...

Selaou 'ta, va merc'hig !

AR VOUEZ. — Dre c'halloud da zaelou, o plac'hig fur ha glan, setu m'eo kroget adarre an tan ! Bez dinec'h; ha gant va bennoz, kas ganez ar glaouen-nou ruz-beo-mañ... Kerz, Gwenaela, plac'hig vat !

AN DISPLEGEREZ. — Na pebez levezet ! Ha Gwenaela, laouen, a gemer en he dorn ar podig o tivogedi (*hemañ a vo bet lakaet dirak an nor gant eun dorn, hep ma ve gwelet den ebet*).

Hag hi en hent, etrezek ar gêr.

Kerzout ha poania he doa graet abaoe ma oa savet. Ha Gwenaela he doa naon ; bez' he doa sec'het ha skuiz e oa. Tremen a ra bremañ adarre dirak ar forn.

AR FORN. — Gwenaela, Gwenaela ! Kemer an dorzig-mañ am eus miret evidout !

AN DISPLEGEREZ. — Gwenaela a gemer an dorzig, melen ha brao, hag emañ-hi o vont d'he debri.

GWENAELA. — Nann ! Nann ! ne fell ket din... Evit va zad e vo !

AN DISPLEGEREZ. — Hag hi o lakaat an tamm bara en he godell.

Pa dremen dirak ar puñs e klev :

AR PUNS. — Gwenaela ! Setu dour fresk evidout !

AN DISPLEGEREZ. — Eva a ra... ha setu torret, war eun dro, he sec'het hag he naon, hag he skuizder.

Pa dremen dirak al liorz, setu ma astenn ar wezenn davêti he skourrou leun a avalou ruz ha kaer.

AR WEZENN. — Kemer, Gwenaela ! Kemer, evidout eo va frouez kaera !

AN DISPLEGEREZ. — Ha Gwenaela o leunia he zavañjer evit o digas d'ar gêr gant ar bara a oa en he godell, hag ar glaouennou-tan a oa c'hoaz ruz-beo en he fodig.

(Gwenaela a ya kuit dre an tu kleiz ; ar gouel a gwez ; ar wezenn, ar forn hag ar puñs a ya kuit ; sevel a reer adarre doare-diabarz ti Gwenaela.)

N.-B. — Mar deus diou ouel war al leurenn c'hoari, e c'heller sevel diabarz an ti en a-dreñv, da veza kuzet gant ar gouel-kreiz, goude an daolenn genta ; an eil taolenn a vo c'hoariet neuze dirak ar gouel-ze ; ar gouel-araok a gouezo hepken epad ma vo o tont war al leurenn hag o vont kuit ar wezenn, ar puñs hag ar forn.)

TEIRVET TAOLENN

E ti Gwenaela. Houmañ a zeu ebarz, laouen, hag a gempenn an traou : ar c'hevioù war an oaled, ar bara gant ar frouez war an daol. Kanà a ra, war don « Hirvoudou ».

GWENAELA. — Penaos oc'h-c'houi ken kaer sammet,

o taolig koz e kreiz an ti ?

Ar bara mat, frouez darevet,

a garg ac'hanout, eun dudi !

Ha te, oaled, te ' oa maro, ha va c'halon oa ankeniet.

Bremañ buhez ha levezet gant an tan-ruz zo distroet !

AL LEZVAMM (o tont en ti). — Petra a welan ? Petra a welan ? Eus a belec'h e teu an traou-mañ ? Te ac'h eus o degaset amañ ? Pelec'h ac'h eus kemeret anezo... pe laeret ? Lavar... N'eus ken a avalou el liorz, ha biskoaz bara ken brao n'eus bet poazet en hor forn. Komz a ri ? plac'h villiget. Laeret ac'h eus ! Ya ! laeret ! Mez warnout, ha war an ti-mañ !

AN DISPLEGEREZ. — Hag hi o sevel he baz evit skei war Wenaela, mantret. An daelou, adarre, a zeu d'he daoulagad. Unan anezo a gouez ouz bruched ar vaouez fall. Pebez burzud ! Houmañ a jom sabatuet : a greiz-holl e teu da ziskouez eun dremm laouen-meurbet, e lec'h ar penn drouk he devoa araok.

(Evit an dra-mañ, ar vaouez a zav he daouarn unan eus pep tu d'he dremm, evel eun den estlamm, hag e serr ar jestr-se e tenn he maskl drouk a gouezo d'an douar.)

AL LEZVAMM. — Petra a c'hoarvez ganen ? O tra iskis ! Tan an ifern a oa em c'halon, ha da zaelou o deus lazet anezañ. N'em anavezan ken va-unan. Daoust ha madeleuz e teufen da veza ?





AN DISPLEGEREZ. — Gwenaela ne lavar ger. Daoust ha gwir e vefe kement-se ? Chom a ra he daouarn kroaziet, eur mousc'hoarz a ziwan war he muzellou, e keit ma tosta he lezvamm outi.

Hag evit an deirvet gwech, setu ma klever ar vouez.


AR VOUEZ. — Daelou eur galon c'hlan a zo galloudus bras. Da deneri-digez, Gwenaela, he deus trec'het war ar fallagriez. N'az pezh ket aon ken, Gwenaela !

KAN DA ECHUI

(Gant an displegeret, ar wezenn, ar puñs, ar forn, a zo deuet war al leurnen gwisket gant pep a zae hir, gwenn pe a liou sklaer. Epad ar c'han al lezvamm a lak he brec'h war ziouskoaz Gwenaela, ha pa echu ar c'han, e stard anezi etre he divreo'h, en eur boket dezi.)



Hag abaoe neuze Gwenaela, laouen,
A vev e peoc'h e ti he zad.
N'he deus ket aon e tistrofe an ifern yen,
Nag e varfe tan ar garantez,
Pa 'z eus awal'e eus eun dael da skedi 'r baradoz,
Ha teneraat eur galon.



GWECHALL E KERWENN:

gouel-granch

Kounoul du eus kostez ar mor a zegas amzer defival ha barrou glao puih. Evit doare, ne zavo ket; krog eo da vat:

Ne lavar biken gaou ».
« Arne ar Faou ».

Ken da ze, an devez a dalvezo mar-teze da ziskuiza. Da vihana, ret e vo chom wardro ar gêr, tost d'an disglao. Setu perak e vez anvet eun hevelep amzer: « gouel-granch ».

Ar vugale a zo lorc'h enno. Aze emaint edoug an deiz: ar yaou a zo.

Ar mevel bras en devezo amzer da skrivellat ar c'hezeg, ar pezh ne vez ket gellet ober piz bemdez. Mont a ray zoken wardro ar c'hreier saout: Soaz a vezo dizammet gantañ diouz al labourou pounnera. Kaout a ray meur a dra da gempenn: dornet mat eo, a drugare Doue. Evelse, eul laouer e bilibann er c'hraou a vezo diazezet gwelloc'h; ar stagou dister hag ar jaden-nou torret a vezo renevezet; ar sternajou ivez, hag ar fouet, betek lost an douchenn.

Per a zo en ti-forn dirak e stal-galvez: krog eo da ober eur skeul nevez. Gantañ Mikael a zesko: lakaat bizier en eur gloued, troada eur benveg, ober naskou d'ar zaout, spisa eur gordenn... En e garg e vezo c'hoaz drailha ar boued-chatal, bervi ar podad rabez, ha lemma ar gontel-eeun evit ar merc'hed.

Ar re-mañ, e stern an daol, o deus dispaket eur bern dilhad a bep seurt. Gant daou damm fall e vezo klasket sevel unan mat. Egiz dilhad nevez ne weler prena nemet nebeut a dra. Eun dilhad eured a dalvez wardro ugent skoed; eur bragez-pann, tri skoed; eun tok boulouzenet gant blouk arc'hant, wardro pevar skoed... Beza ma padont keit hag ar vuhez, ker int!

Al liñseriou roget a zikour, diouz ret: an tammou bras evit an dilhad, ar re vihan a ray torchou listri.

Souezus eo pegen kreñv eo an dan-vez. Al lien a zo bet graet er gêr gwechall, pa veze eosted amañ lin ha kanab diouz an druilh. Dilezet eo bremañ an drevajou-ze. Ar poull-lin ne zalc'h mui nemet e ano. Ar beoliou bras divent a jom goulllo hiviziken. Da vihana ar vugale a glev gant o c'hêrent penaos e veze pourveet an tiegez gant o zud koz. Ar gwiader a zeue d'an ti gant e stern-labour. E Kerwenn, eme Soaz, e oa bet graet en taol diweza c'hoaz: ugent liñser ha tammou bihanoc'h hep kont. Ha pebez danvez! Ar zier, goude hanter-kant vloaz, a zo c'hoaz kals gwelloc'h eget ar re nevez a brener hirio. N'o deus graet nemet kaeraat: ez nevez, al lien a veze damvelen, bremañ eo gwenn-kann; ez nevez e veze kalet, gouest da ziruskla ar c'hroc'hen; ar rochedou alies a veze douget da genta gant ar paour, evit teneraat an dan-vez...

An diou c'hoar vras a ra kemenerez gant o mamm. Ar vugale vihanoc'h ne ehanont ket da droidellat, da firboucha e pep korn, betek er c'hraou moc'h, rak n'o deus ket aon ouz ar zorc'h... Penaos miret outo da c'haloupat, da zastum strodenn, da veza glebiet? Da c'houlenn bara int deuet. Hogen ar billig a zo war an tan. Soaz, gant he spanel, a zo oc'h ober *krampoez*. Ar vugale a jom eta war an oaled da c'hedal o lod. Ar c'hrampoez mac'ha-gnet a vezo lonket evelse, pep hini eus ar vugale d'e dro.

O mamm a ginnig dezo ober elumetez! Drailhajou koad a vez atao: ganto e vezo graet « ibilhou-penn-tan », netra muioc'h. Eur gastolorenn goz war an tan, enni rousin ha souffr o teuzi: an ibil soubet eharz a dalvezo, gant eun tamm regedenn, da elumi al letern, an tan... Seul nebeutoc'h a vezo da brena.

« Noch » ar vilin a deu da ober *eur weladenn*. Komz a ra hep gedal respont, chaokat hep ehan, kaketal... Ar gwasas klapezennoù a vez atao ar brasa o genou!

Ya! He genou dezi a oa bet re vras er zizun dremenet. N'oun dare penaos, divarc'het he doa he c'harvaniou: digor he beg evel eur pesk war al leton, n'oa netra d'ober evit serri anezañ; glaourenn fors pegement, evel neud-orjal o tont eus he genou. Ger ebet ne c'helle lavaret. Estlammus oa!

Buan ha buan de glask ar medisin da Bloueskad, pemp leo ac'h'alenn. P'en em gavas, ar medisin a zirollas da c'hoarzin o welet « Noch » oc'h ober neud-orjal, dic'her, truezus.

Ne voe ket hir na diaes ar para: eun dorn dindan he groñj, egile war he fenn, dao! ar c'harvaniou en o renk, ha Noch are klok, fardet a-nevez evit glabousat. Ne baouezo ket ken!...

Eur paotr bihan a zo klañv er vilin. Gouzout a ra Noch e kavo e Kerwenn sikour ha frealzidigez raktal...

Evit peurechui an hada, e c'hoanta ivez eun nebeut ed. Roet e vezo dezi hep marc'hata: diwezataoc'h, e ray devezioù c'hoennat evit digoll he mad-oberourien.

Olier an Traon en em gav ivez: gwall-glañv hiviziken, dinerz da labourat. Bet mevel e Kerwenn epad hir vloavezioù, e teu alies da welet tud ha tiegez. Ma n'eo ket re bounner ar glao, e ray tro an tiegez hag an douarou; atao avat e ray eur gwel d'ar c'hreier, Goude pemzek vloaz poania en tiegez, eul lodenn eus e galon a zeblant chomet eno... Zoken klañv, Olier a zistro gant lorc'h... Gwir eo, eun draen bennak a zo da denna: « Ali hag holenn a vez roet da bep goulenn ».

Eul lizer-ferm nevez a zo kinniget dezañ. Olier a oar lenn: er skol vrezonek eo bet war al leor « Domine, labia ». Hogen lizer an Aotrou a zo e galleg. Ne c'heller ket lakaat « konterolli » (1) eul lizer-ferm skrivet e brezonek, yez hor bro! Dont a ra Olier eta da c'houlenn kuzul digant barre-koc'h egetañ... Moarvat Per a gaozeo evitañ; anaout a ra kaer an Traon, ar merour hag ar perc'henn. Hag eun den n'emañ ket e viz e gwask a vez muioc'h dinec'h da ober goulennou, da druezil... hep lavaret a berz piou e teu. Gant Per ne vo ket dilezet ar reuzeudig.

Neventi all! Eur bugel muioc'h a dle genel adarre en Traon. Piou a vezo paeron pe vaeronez? E Kerwenn, Olier a c'houlenn an eil pe egile. N'eo ket en aner!

Eur paour a zo en em gavet ivez e Kerwenn. Bep sizun, daou pe dri a deu evelse da glask o bara. Hini ebet ne vez pellaet morse hep beza kreñvaet, maget, frelzet. Ar memes re eo a vez gwelet o tizrei: n'int ket tud estren.

War an deiz, ar beorien ne reont nemet kemer eun tamm bara pe voued. Pe deuont diouz ar pardaez eo evit klask lojeiz.

Atao e reont heñvel. Dirak dor an ti, an den, diskabell, a lavar eur bedenn a vouez uhel. Soaz pe unan eus ar vugale a ya da rei dezañ e damm bara. Pa vez poent ar pred, e teu da zebri war ar skaon peuliesas.

Ma teu evit an noz, e vez diskouezet dezañ da genta ar goloeg hag ar c'hraou zaout, rak eno eo tommoc'h eget er c'hreier all. Ar paour a gerc'h eur vriad kolo pe ziou; o eeuna a ra evit kompeza e dorchenn; e visac'h a dalvezo da blueñk-penn, e vaz da skei war ar razed, diouz ret.

Goudeze e teu da goania gant an tiad abez: laez ar pouloud pe zoubenn ar jaodel.

E tal an tan e tommo e izili en eur zec'hi e zilh, o tibuna eur gontadenn bennak pe o c'hoariellat gant ar vugale vihan...

Antronoz, goude dijuni, ar foeter-bro a gemer e visac'h hag e vaz evit kerzet pelloc'h... evel Boudedeo. Eun tamm dilhad bennak a vo kavet da rei dezañ mar deo aet re zister e druilh.

Heñ a lavaro eur bedenn evit trugarekaat, hag, en eur gimia, « Bennoz Dou d'an holl ».

H. GREFF.

(1) « Enskriva » a vefe brezonekoc'h.



PREZEGENN VURZUDUS PERSON SANT-KEG⁽¹⁾

— I —

Bremañ ez eus eur pennad amzer a zo,
Person Sant-Keg a oa nec'het maro :
nec'het bras oa zoken gant e barrezioniz,
rak rouesaat a raent da vont war dro an Iliz.
Kaer en doa lakaat e gleier war vole,
Sant-Kegiz ne deuent ket muoc'h da zelaou evit an dra-ze.
Setu ar Person kaez glac'haret holl,
rak n'en doa ket a c'hoant ez ajent da goll.
Ha penaos o lakaat da zistrei war an hent mat ?
Setu aze eun dra ziaes da ober avat.
Met ar Person-ze a oa eun den speredek,
ha setu amañ petra a reas e Sant-Keg.
Lakaat a reas enkanti eur zulvez vintin dre ar vro
en doa eur zarmon burzudus da ober dezo ;
ha kement hini a deuje da glevet
dioustu da Zoue 've distroet.
Neuze avat, er zulvez-se, e savas kabal gant Sant-Kegiz,
ha kement den a oa er barrez a ziredas d'an iliz.
Neuze an aotrou Person er gador a zavas,
ha d'e barrezioniz e lavaras :

« Va breudeur ha va c'hoarezed kristen, en noz-mañ
am eus graet eun huñvre spontus ! Deoc'h ez an da gonta.
Ya ! Huñvreet am eus edon maro, va zudou,
he va ene paour a yeas wardu an neñvou.
Nijal a ris di zoken e berr amzer,
betek dor ar baradoz da gaout Sant Per.
« Demat deoc'h, aotrou Sant Per, emeve ;
me eo Person Sant-Keg ! Anaout a rit ar barrez-se ?
— Sant-Keg ? Sant-Keg ? emezañ, nec'het bras,
n'am eus ket bleuet ano eus ar barrez-se biskoaz !

— II —

Koulskoude e tleont beza holl er baradoz !
— Gortozit, aotrou Person, ma welin ; azevit aze da c'hortoz.
Abenn eur pennad e teuas en dro, warnan eun aer nec'het,
hag e lavaras din : « Nann, Person kaez, er baradoz n'eus Sant-Kegad ebet.
— N'eus ket ! aotrou Sant Per, e pelec'h emaint 'ta neuze ?
— N'ouzoun ket, nemet er Purgator e vent marteze...
Ha me sevel diwar va c'hador ;
an dour em daoulagad, ez is 'tal ar Purgator.
Eno e tal an nor oa eun Arch'hél gant eur c'hleze tan.
En eur grena, me a c'houlennas digantañ :
— Aotrou 'n Arch'hél, lavarit din, en an' Doue,
ha va farrezioniz a ve er Purgator aze.
— Gortozit, aotrou Person, ma 'z in da welet.
Hag heñ kregi en e gaier bras, ha sellet.
Abenn eur pennad goude e teuas d'am c'haout war dreuzou an nor,
hag e lavaras din n'edont ket er Purgator.
— O ! va Aelg paour, 'pelec'h e kavin an dud-se ?
— Pa 'e emaint ket amañ nag er baradoz, emaint duhontou,
eme an Arch'hél, en eur ziskouez din siminaliou.
Duhont, aotrou Person, emañ an ifern, emezañ.
Mat ! Kazi-sur emañ ho parrezioniz ennañ.
— En ifern ! emeve, strafuilhet holl !
O ! mevar, an dud keiz n'int ket aet keit-se da goll.
— It atao, aotrou Person, da welet betek ti Baolig.
Hag evit mont di e roas din eur botou-houarn atomik.
Setu me war hent an ifern ; na pebez hent spontus ! Naered
ha tousegi a oa warnañ ; hag a bep tu din, tan ha moged.
P'en em gavis eno, Lusifer a youc'has warnoun :
— Petra out-te deuet da glask amañ, koz Person ?
— Deuet oun da c'houlenn diganez, Paolig, ha te 'pe ar vadelez
da lavaret din hag en ifern e ve Sant-Kegiz, tud va farrez.
— Sant-Kegiz, emezañ, gant eur youc'hadenn skiltrus,
ya avat ! amañ emaint holl. Deus 'ta, Person, da zellout outo dre c'henou
[ar puñs !

— III —

Ha me sellet. Ha petra a welis ?
Eno edoc'h holl en tan, va farrezioniz !
Kenta hini a welis eno oa Chani Koustañs,
an hini a zo er bourk o terc'hel ar zal-dañs ;
eun diaoul tort hag eun diaoul luch a oa o tañsal ganti,
hag a vezo epad an eternite o lakaat tro enni.
Eno e welis ivez Chanivon ar Bleaz,
ar vaouez hag a werz d'an dud dour en he laez.
Gwelout a ris c'hoaz ar bouloñjer, ar c'higer,
hag holl everien win ar barrez, en o fenn Chob al Lonker :
eno edont o pompa gwin bero en eur pezh barrikenn,
da ober gwin koz da ziaoulou an ifern.

Ha dre c'henou ar puñs diweza e welis Biel ar Maleurus,
oc'h astenn din e zivrec'h gant eun aer ken truezus :
— O, aotrou Person ! Me a zo prest da binta gant ar zec'hed,
m'am bije gouezet, n'am bije biken evet !
Ha me, ho Person, n'oa ket gouest da ober evidoc'h netra,
netra, ouz ho kwelet en eur stad ken truezus, nemet da ouela.
Setu aze va breudeur kaez, an traou spontus am eus gwelet en noz-se,
eme ar Person paour, en eur echui da gonta dezo e huñvre.
Mat, va zud-keiz, kredit ac'hanoun,
strafuilhet holl gant sarmon burzudus o Person,
Sant-Keg a zo bremañ enni, 'vel a zo e pep bro e Breiz-Izel,
kristenien vat, tud fur ha tud santel...

(1) Ar rimadell-mañ a zo bet dastumet e bro Rosko.

Nedeleg Yannig ar C'hornandon

Eun devez, bremañ 'z eus pell, eme ar vamm-goz, ez oa eur c'hornandon en eun enezennig e kreiz ar ster. E-unan edo, meur a vloaz a oa. Koz oa deuet da veza; hag e soñje oa tost dija an eur ma vefe da welet e vamm, ar gorriganeg Jannedig. Ken trist oa an ti p' oa marvet e vamm, m'en doa e guitaet da vont da jom en enezenn.

Met araok mervel, Jannedig he doa lavaret dezañ : « Da zeiz Nedeleg e teui d'am gwelet, pa ne redo mui ar ster ».

Ha bep bloaz abaoe, pa dostae Nedeleg, ar c'hornandon ne denne penn eus ribl ar ster, o c'hortoz ma yafe da zec'h, evit mont da welet e vamm.

Met kaer en doa gortoz, ar ster a gendalc'he da redet da c'houl Nedeleg kouls hag er peurrest eus ar bloaz. Koulskoude ne fallgalone ket : fiziañs en doa e komz e vamm n'he doa lavaret morse dezañ an distera gaou.

Setu, eur bloavezh, deuet adarre gouel Nedeleg. Yannig a zeu da azeza war eur men a-us d'an dour a oa en devez-se izelloc'h eget biskoaz.

« Ma c'hellfen, emezañ, dizec'ha ar ster, e yafen da welet va mamm. Met penaos ober ?... An dour-ze a dle dont eus eun tu bennak ! Ma oufen eus a belec'h e teu, e lavaret d'an den a lez an dour da redet serra an duellenn... Neuze e tizec'hfe ar ster hag e yafen da welet va mamm ! »

Hag ar c'hornandon bihan d'ober e bakadig. Hag en hent da welet e pelec'h e kroge an dour da redet.

Buan e kerze hag abenn an noz en doa graet pemp leo. Treuzet en doa kals foenneier ha parkeier, met ker ebet.

A daol trumm, p' edo an heol o vont da gousket, ec'h erruas dirak eur gêrig. Souezet bras e-voe Yannig, rak n'en doa biskoaz gwelet eun dra ken kaer : an tiez a lugerne gant gouleier a bep seurt liou. Bep an amzer, eun nor a zigore ha tud a gerze wardu eun ti brasoc'h eget ar re all. Eno e veze klevet kanaouennoù. Eur c'hloc'h a dintas daou pe tri daol, a dregernas dre ar vro abez, goloet bremañ gant mantell steredennet an noz.

Yannig a jom a-zav, nec'het : n'eo ket aes bale en noz ! Perak ne yafe ket evel an dud-se d'an ti bras a zo ahont demdost d'ar ster ?... Dre ma tostae e klevae fraesoc'h ar ganaouenn ; ha ken brao oa ma chome a-zav da zelaou. Aon en doa : petra dremene en ti-ze ?... Met e aon a deuzas pa welas pegen laouen oa an dud dreist-holl ar vugale.

« Deomp ebarz, eme Yannig. N'oun ket bras ha ne gargin ket kals a blas. Marteze e c'hellin gortoz an deiz aze ! »

Ar c'hornandon bihan a voe mantret holl pa yeas en iliz. Ne gredas ket finval gant aon na echufe an huiñvre a gave dezañ ober. Eur c'horn dreist-holl a oa kaer ha sklerjennet, hag an holl a zelle wardu eno. Met n'oa ket evit gwelet mat : kaout a rae dezañ oa eur c'hraouig gant eun ejen hag eun azen a bep tu d'eur vaouez kaer meurbet.

Hag e soñje Yannig : « Bremañ pa vo aet an dud kuit, ez in tostoc'h ». Tremene a reas e amzer o sellet en dro dezañ. Eur skeudenn dreist-holl e penn uhela an iliz, a oa ken kaer ma n'oa ket evit tenna e zaoulagad diwarni : kaeroc'h oa c'hoaz eget e vamm ! E vamm ?... Ha ya, dizoñjet en doa evit petra oa en em lakaet en hent ! « N'eus fors, emezañ, warc'hoaz am bezo amzer, he ne din ket kuit araok beza gwelet ar c'hraouig a zo ahont ! »

Pegait e padas ar Pellgent ? N'eo ket Yannig a ouezfe hel lavaret. Inouet ne voe ket ; morgousket eo a reas. Hag e teuas a nevez ennañ e-unan gant trouz an dud o vont er maez.

Goulo an iliz ha teñval, nemet eur c'houlouenn e kichen ar c'hraouig. Goustadik e tosta, hag e wel eur bugelig astennet en eul laouer, war eun dornad kolo, e vamm hag e dad en e gichen, eun azen hag eun ejen eun tammig war an adreñv.

« O ! ma vije va mamm ken kaer-ze ! » a zoñje Yannig. Chom a reas eno pell-pell, betek goulou deiz, da zellet ouz ar bugel, ouz e vamm... Heñ a zo ivez o klask mont da welet e vamm !

Erfin e soñjas oa marteze poent loc'h adarre. Ha Yannig er maez.

Met cheñchet holl oa an traou. Dec'h, n'oa ket gwenn an dour, hag hirio ez eo !... Diaes eo bale. Evelato ec'h en em denn eus a douez an erc'h.

Met kaer en devoe klask ar sterig, n'he c'havas ket : goloet oa bet gant an erc'h hag ar skorn epad noz Nedeleg, ha ne rede mui...

Soñj a deuas da Yannig eus komzou e vamm : « Da zeiz Nedeleg e teui d'am gwelet pa ne redo mui ar ster ».

Hag e gwirionez, ar sterig ne rede mui !

Kement a levenez a deuas en e galon ma kouezas eno war an erc'h ; eur pennadig goude oa sounnet holl gant ar yenien.

Aet oa Yannig da welet e vamm !

YANN GORRIGAN.

(1) Kornandon : korrig, den bihan a faltazi, a vez allet anezan er c'hontadennoù koz.



Lennit bep miz « AR SONER » kazetenn BODADEG AR SONERION, e brezoneg hag e galleg. Kuzulioù d'ar sonerien, tonioù nevez, kanaouennoù, kuzulioù ha fentigelloù a bep doare a gavot ennan. Polig MONJARRET, avenue de la gare, Carhaix, C.C.P. Nantes 1486-15. Ar skouerenn 35 lur, ar c'houlmanant 400 lur.

M'hoc'h eus eul levr brezonek da brena ha na gavit ket en dro deoc'h, skrivit da B.A.L.B. (Breuerie al levrigoù brezonek), 8, straed Legraveyend, Roazon. Goulenit eno degas deoc'h evit netra roll al levrigoù brezonek o deus da werza.

Unan din-me
Unan dit-te
Unan din-me
Unan dit-te

E PEP KER, E PEP TI...
EUN DEIZIADUR DA BEP HINI

Deiziadur-Bras "AR VRO"

E BREZONEG PENN DA-BENN
BRAO HAG AES DA LENN...
HA GANT 12 SKEUDENN

Priz ar skouerenn dre ar post :
4 timbr 15 lur

Priz dek sk. : 400 lur

Priz evit ar veleien
hag ar strolladoù :
30 lur ar pezh
30 skouerenn d'an nebeuta

PRENA AN DEIZIADUR
a zo kas da yalc'hig
KROAZ-BREIZ «Magadur»

KASIT HO KOULENN HAG
HOC'H ARC'HANT da
Abbé BLEUNVEN, recteur, Plomelin
C. C. P. 12 66.53 Rennes



Aman, eus ar Werc'hez Vari eo bet ganet Jezuz

NEDELEG E BETLEEM

Derc'hent Nedeleg ! Eun abardaez sklaer ha sioul : daou gloareg yaouank, unan anezo eus eskobti Kemper, nevez degouezet o daou e Jeruzalem, a gemer hep dale an hent a gas betek Betleem, diou leo-krefiv er c'hreizteiz da Jeruzalem.

Buan e tiskenn an noz war ar Pales-tin : arabat eta chom da abegi na da youli dirak staliou kaer Jeruzalem.

Derc'hent Nedeleg ! Bremañ 'z eus wardro 1950 vloaz, d'ar memes mare, e kerze war ar memes hent Josef ha Mari : drant ha seder e kerzomp war o roudou, evit hon tro genta.

Evelto, e taolomp sellou piz war ar maeziou tro-dro. A-zehou, ne welomp kouls lavaret netra, ha n'eus netra da welet ! Ne c'hellomp ket avat distaga hon daoulagad diouz an tu kleiz : an heol, o tiskenn war menezioù moug-teñval Bro Moab, a laka da ruzia sabrenn rouz menezioù dizec'h ar Jude... E traoñ ar menezioù-ze e welomp awechou er c'hornig bihan eus ar Mor Maro, ledet evel eur meleziour arc'han-

tet. Er parkeier, tostoc'h deomp, ne-beut a dra : amañ hag ahont, eur we-zenn fiez pe olivez, gant o dellou bihan arc'hantek... Ar gwel eus an traoù-ze ne wir ket ouzomp da zerc'hel heppad dirak daoulagad hor c'halon skeudenn Jozef ha Mari, en eur zibuna hor cha-peled.

Goude eul leo vat, setu-ni war gri-benn eun dorgennig. En eun taol, emañ dirazomp kêrig vihan. Betleem, laouen ha sounn gant he ziez gwenn, savet war gorre pe ouz kostez eun dorgenn all, a vihanoc'h eget eul leo all diou-zomp. Dirak bro ar roue David, ha bro Hor Zalver Jezuz, e teu war hor mu-zellou kan ar Magnificat.

Evit Betleemiz, Nedeleg e Betleem n'eo mui eun dra a-bouez, eveljust : dre re a voaz, e tivlaz pep tra ! Kêr ar Zalver a vo sioul, hanter-varo.

Diskouez a reer deomp an hent war-du an Iliz-Veur, betek ar blasenn vihan a zo dirazi, ha ni da c'houlenn : « E pelec'h 'ta emañ an iliz kaer savet

amañ gant an impalaerez santet He-lena c'houezek-kant vloaz a zo ? » Mantret e chomomp pa vez diskouezet deomp, er penn all d'ar blasenn, eur mell moger difeson, graet a dammou disheñvel, gant prenestrou stanket pe vihanaet, diwallet gant bizier houarn ; evit porched, n'eus nemet eun tamm toull-dor, ken izel ma rankor plega ar penn evit tremen ebarz.

Paourkaez iliz-veur, an hini ziweza eus an holl ilizou savet gant santet Helena war al lec'hioù santel !

Mar deo gwall-gaset a-ziañvaez, an diabarz a zo bet dalc'het kals gwelloc'h, a drugare Doue, daoust d'ar c'hantvedou ha d'ar brezelioù.

Dindan an douar, kouls lavaret a-zindan an aoter vras, eo eman ar C'hroc'h santel, graet anezi eur japelig izel ha teñval, karget a gantoloriou. Enni, eur steredenn arc'hant dindan eun aoter vihan, a ziskouez deomp e pelec'h e voe ganet Jezuz ; ar c'hom-zou-mañ, skrivet e latin, a zo da heul : « Amañ, eus ar Werc'hez Vari eo bet ganet Jezuz ».

« Christus natus est nobis ! Venite adoremus. » — Ganet eo deomp ar C'hrist ! Deuit ! Adoromp anezañ !


Poent eo deomp bremañ tostaat evit kana Ginivelez Hor Zalver. Na pegen

c'houek e vije bet kana an ofisou-mañ e Iliz-Veur santet Helena, hini ar C'hinivelez ! Siouaz ! Etre daouarn ar C'hreked chismatik emañ-hi ivez, ker-kouls hag eul lodenn eus ar C'hroc'h santel.

Tadou sant Frañsez, karget da zi-wall al lec'hioù sakr, o deus ranket dre-ze sevel eun iliz all, hed-a-hed gant hini ar C'hinivelez : iliz santet Katell eo !

Leun mat eo an iliz, rak heuliet eo ar Pellgent gant kals perc'hirined ha gant kristenien ar vro, pell dezo beza sioul ha mut ! Met n'eus fors : an Tadou a deus mouez, hag an Ofis a ra mat e hent, kaer meurbet !

War an holl dilhad sakr, e lec'h ar groaz, emañ skeudenn ar Mabig Jezuz, a zegas da zofij, hep ehan, e lidomp Nedeleg e Betleem. Na pegen kalonek, pegen nerzus, e kanomp an « Te Deum » ! Na pegen c'houek dreist-holl n'eo ket klevet amañ, e kichen kavell Jezuz, e kreiz nozvez Nedeleg, an he-kleo eus kanaouenn an Elez, ya, ar « Gloria in excelsis », bet kanet er c'horn-douar-mañ evit ar wech kenta gant mouezioù ha n'oant ket eus an douar-mañ ! Met Jezuz e-unan, d'ar Gorreou, a ziskenn en hon touez, kuzet, sioul ha dister, evel gwechall. Dre vis-ter burzudus an oferenn, e advevomp e gwirionez mister an Nedeleg kenta, gant Jezuz hag e gerent santel.




Kals c'houekoc'h c'hoaz e vije bet, aklaer eo, heulia an ofiz a-bez er C'hroc'h santel.

Da vihana, goude an oferenn, dre riboulou striz kleuzet en douar hag er roc'h dindan an iliz-yeur, e yelo betek enni ar brosesion. An Avielar a gan deomp adarre Aviel ar C'hiniwelez. Pa zegouez gant ar c'homzou : « Et peperit Filium suum primogenitum » (« Genel a reas he Mab kenta-ganet »), e kemer etre e zaouarn eur skeudenn goar ker bras hag eur bugel. P'en deus kanet goudeze « et pannis eum involvit » (« hag e lakeas en dro dezañ mailhurou »), e wisk ar skeudenn gant dilhad flamm, hag e ya da astenn anezi en eul laouer, en eur garra « et reclinavit eum in praesepio » (« hag ec'h astennas anezañ en eul laouer »).

« Ganet eo deomp eur bugel : deuomp holl d'e adori ! » Echu eo bremañ ar Pellgent, eur Pellgent burzudus.

D'hon tro, ne gavomp bremañ degemer ebet en ostaliri. Met, e lec'h mont da c'hourvez, evel Josef ha Mari, en eur C'hroc'h distro bennak, e tizroomp betek Jeruzalem.




Tro-dro Jeruzalem

Dudius eo an noz santel, sioul ha sklaer !

Aze, en eun draonienn tostik ouz kêr Betleem, emañ Park ar Bastored; hirio avat, ne ziskenn Ael ebet eus an Neñv evit kana deomp ar « Gloria in excelsis »... Met hekleo ar c'hantik-se ne ehan ket da zevel en hor c'halonou, laouen da veza advevet Nedeleg e Betleem.

PER GUICHOU.



Iliz Perros-Guirec



Sant Loeiz-Vari a Vonfort



(1) Gwelit « Kroaz Breiz », n. 13, mae 1949, p. 4.

Sant Loeiz-Vari, beleget, en deus tremenet eun nebeut mizion e Sant-Klemañs, en Naoned, o teski an doareou da visioni.

Setu Loeiz-Vari a Vontfort kaset da gaout an aotrou 'n Eskob Girard e Poitiers. Perak ? Dorn Doue a zo ouz e henchta betek al lec'h ma tle teurel ennañ diazez eul labour a bouez.

A-vec'h degouezet e kêr, Loeiz-Vari a zo e chapel an ospital, hag epad peder eur, e chomo eno daoulinet o pedi. Ar beorien, o welet eur beleg paouroc'h egeto, a ra eur gest kenetrezo evit kinig dezañ o aluzenn. O welet pegen santel eo, e c'houlennont anezañ evit beza o aluzenner en ospital... An aotrou 'n Eskob, goude enklask, a bed anezañ da gemer ar garg-se. Emeur e fin miz du 1701.

An Tad Montfort n'eo bet nemet bloaz en Naoned, ha daoust d'ar youl a verv en e galon, n'eo bet o visioni nemet pevar miz. Petra a ra dezañ dont bremañ da Boitiers ? Kaout a ra dezañ beza faziet gant e hent ? Nann ! Ne oar ket c'hoaz peseurt labour dispar e ray en ospital ; n'eus nemet eur me-noz en e spered : « Ar fiziañs am eus da c'hellout eun deiz astenn va labour e kêr ha war ar maez eo am laka da vont d'an ospital. »

E' OSPITAL POITIERS

En eur « baourkaez Babylon » eo en em gavet. An ospital n'en deus ket hanter-kant vloaz, hag emañ ar stal, aet da stalig o vont da netra. Ne deu mui sikour eus an diafvez, hag ar reolenn n'eo mui heuliet en diabarz. Labour a zo eta, hag ar beleg a zo dioustu ouz ar stern.

Mont a ra dre gêr gant eun nebeut peorien hag eun azen sammet a bane-rou evit degemer an aluzennoù... Lakaat a ra evez-na vije foranet ar bevañs : eun eur a zo bremañ evit ar prejou, hag eur zoubenn domm a vez roet da bep pred.

War eun dachenn all, Loeiz-Vari en deus bodet merc'hed mac'hagnet : re dort, re vut, unan dall o ren anezo. Bemdez o deus asamblez, evel leanezed, ar pedennou, ar rozera, al labourou ; bemdez e vez lennet en o zouez eul levr bennak evit o zikour d'en em zantelaat. E kreiz ar zal vras e-lec'h ma

vezont bodet, Loeiz-Vari en deus lakaet eur groaz vras, hag eur skritell gant ar ger « Furnez »... Er vodadeg-se eo emañ Loeiz-Vari o vont da hada ar peza a vo diwezatoc'h leanezed ar Furnez.

Evit lakaat an ospital da zoubla gwelloc'h d'e reolennou, Loeiz-Vari a ro e unan skouer vat. E gambr eo an distera en ti. E brejou, ar peza a zo servijet d'ar re baour, pa n'eo ket zoken o restajou...

Renet gant eun dorn ken nerzus, an traou a ya war wellaat en ospital. Siouaz, n'eo ket evit plijout d'an holl ! Ar renerien lik a rank bremañ mont da heul, e-lec'h kaout ar garg hep al labour, evel gwechall, hag, e-lec'h sachha d'o godell, eo ret dezo bremañ sellet a dost ouz an arc'hant. Freuz ha tabut a zo o vont da zevel : amañ, kouls hag e meur a lec'h all, Loeiz-Vari a gavo an arne bez' e ranko mont kuit adarre.

Amzer en do bet koulskoude da ze-veni kals eus e c'hoantou. Epad m'edo en ospital en deus misionet : prezeget e ilizou kêr ; graet katekiz d'ar vugale e iliz Sant-Nikolas a dindan ar c'ho-c'hu ; kovesaet, dreist-holl e iliz Sant-Porchair ; bodet ar skolidi ha graet dezo prezegennou bep sizun.

Etouez ar re a zeu da c'houlenn sklerijenn o c'houstiañs digantañ, emañ Mari-Loeiza Trichet, plac'h yaouank a zeitek vloaz, merc'h da brokuler al lez-varn. Elizabet, he c'hoar hena, he deus lavaret dezi, goude beza klevet eun deiz an Tad Montfort :

— Ar prezeget-ze a zo eur zant.

Ha Mari-Loeiza a ya da goves gant ar zant.

— Va merc'h, eme ar c'hovesour, piou en deus lavaret deoc'h dont d'am c'haout ?

— Va c'hoar eo, emezi.

— Fazio a rit, va merc'h ! N'eo ket ho c'hoar eo, met ar Werc'hez-Vari.

An Tad Montfort en doa anavezet enni an hini a alie beza kenta leanez e urz. Ne vezo ket leanez dioustu avat.

Bez' e ranko da genta bale war rou-
dou an Tad Montfort, beza disprijet,
dismegaset eveltañ. Eviti ivez e teuo
da wir komz an aviel : « Ar c'hreu-
nenn, evit teurel frouez, a rank mervel
ha breina en douar ».

Hi ivez he doa c'hoant mont en eun
urz bennak, hag hep ehan, e c'hou-
lenne digant he c'hoesour hench a ne-
zi : Hemañ a responte hep tro : « N'en
em c'hlaç'harit ket : leanez e vezot »...

Ha setu, eun devez, ma respont dis-
heñvel : « Denit ganen d'an ospital »,
emezañ. Senti a ra, kaset eo da zal ar
Furnez, ha lakaet dindan gouarn ar
rénerez dall.

D'an 2 a viz c'houevrer 1703 ez eus
nevezenti : Loeiz-Vari a ro d'ar plac'h
yaouank eur wiskamant nevez, e dan-
vez griz-louet, a lak an dud da c'hoar-
zin goap outi kerkent ha ma ya e kêr.

He mamm, aet e kounnar war-ze a
glask he lakaat da jefich mennoz.

— Klevet am eus emezi, ez it da
goves gant beleg an ospital. Sodez e
teout da veza, eveltañ ! »

Mont a ra zoken ar vamm da gaout
an Tad Montfort ; hemañ a respont
dezi :

— Ho merc'h, itron, n'eo mui deoc'h ;
da Zoue eo ! »

Hag ar vamm a bleg, daoust d'ar
gounnar a zo enni : kristenez eo, fiziañs
he deus e Doue.

Pa ranko kimiada diouz Poitiers,
Loeiz-Vari a lezo ar geriou-mañ gant
Mari-Loeiza :

— Arabat deoc'h mont kuit eus an
ti-mañ (an ospital) araok dek vloaz
ac'halenn. Ha pa ne vefe ket savet urz
ar Furnez abenn an amzer-ze, Doue
a vezo laouen hag e youl warnoc'h a
vezo bet sevenet. »

Ar plac'h yaouank a zento daoust
d'he c'hoant da vont en eun urz all,
daoust d'ar brezel a vezo graet dezi,
ha daoust ma ranko chom pell diouz
he zad kovesour : chom a ray en ospi-
tal betek eur an Aotrou Doue.

Ganti e chomo eur plac'h yaouank
all : Katell Brunet, eur verc'h laouen
hag a gane hep ehan evel eur pintig.
A bep seurt soniou a deus ganti avat,
hag an Tad Montfort a c'haourrouze.

— Ne ran van ebet ouz ar c'homzou,
a respontas-hi dezañ eun deiz ; an-ton
a blij din ; lakit eur c'hantik warnañ,
hag e kanin anezañ, heñvel. »

Evelse eo e krogas an Tad Montfort
en ero boule'het en e raok gant an
Tadou Mikael an Nobletz ha Maner :

sevel kantikou war rimadellou ar bed,
ha dre-ze, kas da get ar c'hanaouennou
fall.

Eun nebeut bloaveziou diwezatac'h,
ar pintig a deuo da veza « Sœur de la
Conception ».

* * *

Re fall e ya an traou bremañ e
ospital Poitiers. Loeiz-Vari a grog'eta
en hent adarre, en dra-mañ *wardu Pa-
ris* :

Mont a ra war eun betek *ospital
ar Salpetriere*. Lavaret e ve en defe
poan o cheñch stad. Bet wardro ar re
baouez Poitiers, e kemer amañ e vicher
goz : labour vat a ray ivez. N'oa ket
par dezañ da gentelia ar re n'anave-
zent seurt eus ar relijion, da zistrei ar
bec'herien da Zoue ha da frealzi en
dud er boan.

Siouaz, an diaoul n'oa ket stag e
Poitiers : eun abardaevez, da goan, an
Tad Montfort a gav eul lizer war e
asied : n'oa mui ezomm anezañ !

Da belec'h mont ? Skei a ra war zor
ar re a zo bet ouz e hench wardu ar
velegiaj : hini ebet ne fell dezañ hen
degemer. E vrasa mignoned zoken, evel
an aotrou Blain, a zilez anezañ... Kaout
a ra loeiz e « Straed ar Pod-Houarn »,
dindan an dereziou, hag e bred e straed
« Cassette », e ti leanezed ar Zakra-
mant metlet ra vezo. Roet e vez eno
dezañ pred ar paour, ha c'hoaz ar
pred-se a vez hanteret gant eur paour
all.

Laouen e kreiz ar boan, leun a le-
venez pa c'hell dougenn eur groaz pou-
neroc'h, Loeiz-Vari a skriv ar geriou-
mañ d'an hini en deus lezet e Poitiers,
Mari-Loeiza Trichet :

« Gwasoc'h eget biskoaz ez oun
paour, staget ouz ar groaz, disprijet.
An dud hag an diaoulou a ra din er
gêr-mañ eur brezel dudius ha c'houek.
Ra vezin tamallet e gaou, dismegañset,
ra vezo drailhet va brud vat, ra vezin
lakaet er prizon ! Na pebez donezonou
prizius, na pebez boued mat ! Ar re-ze
eo ambrougerien Furnez Doue !... »

* * *

Ha setu eur goulenn o tont da Loeiz-
Vari. War ar *Menez-Valerian* e oa er-
mited. Abaoe eur pennadig e oa deuet
en o zouez diaoul ar vuhez aes, ha ne
felle mui d'an ermited heulia o reolenn

a g'avent re striz. Ezomm a oa da jefich
penn d'ar vaz, hag evit hen ober ne
voe ket kavet gwelloc'h eget an Tad
Montfort.

E kreiz ar goañv edor, ha war al
lec'h uhel-ze e oa yutoc'h ar yenerienn.
Skorn, avel foll, erc'h, holl mevelien
an amzer griz, a lakae poaniosoc'h bu-
hez al leaned. Setu Loeiz-Vari en o
zouez, oc'h heulia ar reolenn penn-da-
benn, hep klask tamm he skañvaat.
Pedi, yun, en em skourjeza a ra. A
nebeudou e teu ar venec'h da vale war
e roudou : ar peoc'h, ar gwir eurusted
en em zil er gouent gant ar zilvidigez.

Dres d'ar mare-ze e teu d'an Tad
Montfort eul lizer eus Poitiers, warnañ


ar goulenn-mañ : « Ni, pevar-c'hant
paour ospital Poitiers, ho ped gant
izelded a galon ha dre garantez Doue,
da zegas en dro en hon touez hor pas-
tor mat, an hini a gar kement ar beo-
rien, an aotrou Grignon ». Dirak eur
galv evel hennez, Loeiz-Vari n'hell ket
enebi.

En taol-mañ, eo anvet dioustu *rener
ospital Poitiers*.

Araok pell avat e vo ret dezañ te-
c'het a nevez, hag en dro-mañ, e vezo
da vat !

(Da genderc'hel.)

YANN TRANVOUEZ,
S.M.M.



Iliz Kastellin

CABRAGE, CAPOTAGE, PATINAGE

SUPPRIMÉS PAR LA PREMIÈRE

REMORQUE AGRAIRE

adaptée en SEMI-PORTEE sur TOUS TRACTEURS — BASCULANTE sur trois côtés avec vérin
PRIX IMBATTABLES

BEVAN, constructeur, PA MBGEUF (Loire-Inf.) — Tél. 51

EUR BREZONEGER HA N'EO KET EUS BREIZ-IZEL

Tro hon eus bet edoug an hañv 1948 da gomz gant meur a Gembread, hor breudeur tra-mor e Breiz-Veur.

Ar re a zo bet e kamp ar Vrezonegerien e Kleder o deus graet eno anaoudegez gant eun toullad mat anezo : tud hegarat kenañ, gouziek hag anaoudek war draou Breiz, kals muioc'h eget eun darn vras eus ar Vretoned, ar pez n'eo ket gwall lor'hus evidomp. An dud-se a gar Breiz hag ar brezoneg : deuet int bet end-eun da Gleder evit studia hor yez, ha meur a hini anezo a c'hell dija he distaga braoik.

Eur skouer eo evidomp, Bretoned, gwelet diafvaezidi o tont da Vreiz da studia hor yez, pa jomomp-ni ken dizablant dirazi.

Tro am eus bet, abaoe, da gaout em zi epad meur a zvez, eur C'hembread.

Mat, kredit pe na gredit ket, — ar wirionez eo koulskoude ! — ar C'hembread-mañ a oar brezoneg kouls ha n'eus fors peseurt Breizad. Ouspenn, gouzout a oar her skriva, ar pez ne oar ket kals a Vretoned.

Deuet eo eus Sant-Malo betek Brest o komz brezoneg hepken. E Sant-Malo, ezomm dezañ da c'houzout e hent, en deus her goulennet e brezoneg. E Roazon en deus graet kement all. Ha bep tro, en deus kavet tud da respont dezañ e brezoneg.

Bet oun gantañ o redek e meur a gêr, ha dre holl, n'en deus komzet nemet brezoneg. Diaes e vefe bet dezañ ober en eur c'hiz all, rak ne anavez ket ar galleg.

Ezomm ebet da lavaret deoc'h pegen souezet e vez an dud ouz e glevet.

Darn ne gredent ket oa eus Bro-Zaoz, hag e ranke diskouez dezo e baperiou.

En tiez-gar, e c'houlenne digant paotred ar bilehjou : « Eur bilhed mont-dont, mar plij, evit al lec'h-mañ-lec'h ». Hag e vilhed en deveze, nann avat hep sacha evez an holl warnañ.

Eun deiz all, goude beza bet o pourmen en oto-karr, e lavare din : « Komzet am eus brezoneg er c'harr, hag hep ruzia ; an holl a zelle ouzin ! »

Aet oun gantañ betek Beg-ar-Raz.

En eun ti-genwerz, ar vestrez a fell dezi, a-grenn, komz galleg gant va C'hembread.

« Ne dalv ket ar boan deoc'h, eme ve, komz galleg outañ : ne responto ket deoc'h. »

— Penaos 'ta, eme an ostizez, an aotrou ne oar ket a c'hallig ?

— Nann, emezoun.

— Eus pelec'h 'ta eo heñ, neuze ?

— Eus Bro-Zaoz.

— Eus Bro-Zaoz ! Met, me n'ouzoun ket a zaozneg !

— Brezoneg a ouzoc'h avat. Komzit brezoneg 'ta outañ.

— Penaos ! An aotrou a oar brezoneg ! eme ar vaouez, sabatuet ! E pelec'h an diaoul, emezi neuze d'ar C'hembread, oc'h-c'houi bet o teski brezoneg ?

— E Bro-Zaoz !

— E Bro-Zaoz 'ta e vez desket brezoneg er skol ?

— Eveljust !


— Ma ! Biskoaz kement all ! Hag en hor bro deomp-ni ne vez ket graet ! Mantrus eo er memes tra ! »

Kerkent, holl dud an ti a zired, evit gwelet ha klevet eun aotrou eus Bro-Zaoz hag a gomz brezoneg, hag en deus desket brezoneg e Bro-Zaoz, pe gentoc'h e Bro-Gembre ; rak displega a ra dezo ez eus e Bro-Zaoz eur c'horn-bro, hag a zo o chom ennañ Bretoned heñvel ouz ar re a zo o chom e Breiz, hag a gomz eur yez tost-kenañ d'ar brezoneg, hag e vez desket ar yez-se e skolioù ar vro...

An holl o deus bet plijadur ouz e zelaou. Ar vamm-goz a lavar deomp e kar kals ar brezoneg, he deus bet desket ar brezoneg d'he merc'h, hag e tesk houmañ brezoneg d'he bugale yaouank.

Nag e karfemp e c'hellfe holl mam-mou-koz Breiz-Izel lavaret deomp kement all ! Nag e karfemp dreist-holl gwelet an holl Vretoned o karet hag o studia o yez evel ar paotr-mañ a Vro-Gembre !

ABVAODEZ.



An ofiser Alaman hag ar perrok

Etouez an istoriou farsus ha flemmus a gonte ar wazed kenetrezo, e kêr Toulouz, epad m'edo an Alamaned o waska hor bro, setu amañ unan hag a veze kontet alies.

Daou vreur o chom e kêr Toulouz, unan perrukenner, egile liorzer, o doa pignet pep a berroked.

Ar perrukenner a gludas e hini er zal vras, el lec'h ma troc'hed ar baro.

An ostizien, dre ma teuent, o doa plijadur oc'h hegal Koko, hag a zeskas dezañ abred lavaret ar c'homzou-mañ : « Ar Boched d'ar maro ! »

Eun devez e teuas er zal eun ofiser alaman. Ha dioustu ma tigoras an nor, e klevas Koko o youc'h'al a bouez penn : « Ar Boched d'ar maro ! » Ar Boched d'ar maro ! »

Kamm ez eas e c'hehou ! Pa voe lammet e varo, arak mont kuit, ec'h alias start ar perrukenner da zeski beva d'e labous divalo, pe d'e lakaat en eul lec'h all.

Ar perrukenner ne reas van ebet ; re a blijadur en doa gant Koko, hag an ostizien o doa ivez.

Eiz dez goude, deut an ofiser en ti, eur wech all. Hag evel er wech kenta, Koko da youc'h'al a bouez penn : « Ar Boched d'ar maro ! »

En dro-mañ, an ofiser a yeas e kounnar, hag a lavaras groñs : « Er zizun a zeu e teuin en dro, ha mar bez hennez aze adarre o tisonka e gomzou kasat, c'houi, perrukenner a vezo fuzuilhet ! »

Ar perrukenner a yeas da gonta e abadenenn d'e vreur, al liorzer.

« Kemer va-hini-me, sell, a lavaras hemañ, ha lak anezañ e plas egile. Va

ferroked din-me ne vez gantañ nemet komzou santel evelhen : « Doue d'ho klevet ! Doue ra vezo meulet ! Evelse bezet graet ! » Ar merc'hed amañ, her gouzout a rez, ne dennont penn eus an iliz hag eus a japel ar Seurezed, hag o devez mil blijadur o teski dezañ ar pez a glevont eno. Dizale e teskint dezañ kana ar gousperou ! »

Ha setu kaset perroked al liorzer e plas egile.

Siouaz ! N'en em blijas tamm ebet eno. C'houez vat al louzeier a zante, met ne wele mui e vestr hag e vestrez koz, na gwez na bleuniou koant al liorz. Ha setu heñ deuet da veza mut. Ne gane, ne zute, na ne gomze mui : mouzet oa Koko !

Pa deuas an ofiser alaman, ne ranas ger.

« Va gourc'hemennou deoc'h, eme an ofiser, o trei ouz paotr an aotenn. Gwelet a ran ho peus desket beva d'ho labous beg-kamm. »

Araok mont er maez, evit gwelet ha dizonet mat oa al labous beg-kamm, e tostaas outañ, hag e lavaras d'e dro : « Ar Boched d'ar maro ! »

— Doue d'ho klevet ! Doue ra vezo meulet ! Evelse bezet graet », eme Goko, en dro-mañ, gant eur vouez skrijus, en eur zoubla e benn hag en eur skrabat e veg gant e bao.

Peseur penn a reas an ofiser ? N'eo ket diaes da zivinout ! Trenk oa ar zoubenn evitañ !

Ar perrukenner ne voe ket fuzuilhet, met darbet e vœ dezañ sounna o c'hoarzin pa voe aet an Alaman er maez.

PAOTR TREOURE.



Deuet
ar bagou
d'ar porz...



teñzor an d'intin goz

Fañchig Kideller en deus kavet, goude poan, an teñzor kuzet gant e d'intin goz, nevez marvet. Ha c'hoaz eo bet tost dezal beza laeret kerkent. Kaset en deus e dour er goudor, da Vrest.

Dizroet ar paotr yaouank d'ar gêr, e pedas e genderv da zont gantañ d'ar zolier da ober eur pennad marvailhat.

Yann, toutek dezañ, a yeas da heul e genderv d'al laez. Azeza a rejont an eil a-dal d'egile. Ha Fañchig da lavaret neuze :

« Selaou, Yann, pegwir emamp bremañ, amañ etre pevar lagad, ez an da anzav ouzit emañ em zoñj kuitaat Kervrugeg.

— Peur ?

— En deizioù-mañ, paotr ! Hag araok kimiada, e fell din e teufes ganen da di an noter...

— Da di an noter ? a droc'has an eil kouveriad d'egile.

— Ya, Yann ! da lavaret d'an aotrou Korbner renevezi al lizer emgleo a voe graet kenetrezoimp-ni hon daou amañ, eun nebeut deizioù araok ma rannis-me ganez atant Kervrugeg.

— Evelato, Fañchig, n'az pezo ket ar galon da denna va lodenn diganen ! da denna o zamm bara eus genou va gwreg ha va bugale hag a zo...

— Ehan da zinal, keneil, ha bez dinec'h ! Rak n'emañ ket em zoñj tenna da lodenn diganez. Tra ! »

Dremm ar pao-krog a zedereas, hag e kendalc'has :

« O mat, Fañchig, m'emañ an traoù en doare-ze, n'hon eus ken tra da ober nemet lakaat eun diviz all etrezomp... ha mat pell zo !

— A gav dit, paotr ?

— Sur avat ! Kuitaz deomp mont da zispign arc'hant en aner !

— Hañ ya ! Brao eo lavaret an dra-ze paotr !

— Perak 'ta, Fañchig ? Daoust ha n'az peus ket a fiziañ ennou-ma, da genderv-kompez... hep torgenn ebet ?

— Tra ! a eilgerias Fañchig, en eur zevel e c'hourennou ; n'am eus ket, sur avat, pell ac'hano zoken ! Se a zo pennabeg m'am eus lavaret dit dont amañ da gembrezeg ganen !

— N'eo ket en abeg ma kasan da stal da stalig eo da vihana ! Setu aze eun dra ha ne c'heller ket tamall din, rak n'emaout ket hep gouzout n'emañ ket ar c'hiz ganen da staga va chas gant silzig !

— Nann ! Met diderasa a rez da zaouarn gant amann, ez eo, paotr ! eme ar c'houeriad pinvidik gant eur vouez fentus. Ha bremañ, peoc'h war-ze ! Kerz da lakaat da zilhad da zul, ma 'z aimp dillo ac'halenn etrezek studi an an aotrou Korbner !

— Da renevezi al lizer ?

— Ya, Yann ! da lakaat va lodenn c'houm-d-me da zont e godellou an daou baourkez-koz o deus poaniet epad pell amzer ha dalc'hmat da zikour kas tiegez Kervrugeg en dro. Alo ! Lavar yao d'en em gempenn, ha diwall, ma karez, da vont er c'hoad da guzat, pe ahen-dall, me a lakaio klask dit. Hirio e tle an diviz nevez beza lakaet war baper etrezomp, na n'eo ket eun devez all eo !

Yann, kouezet e glipenn war e glo-penn, a yeas neuze da lavaret d'e wreg da belec'h edo o vont ha da ober pe-seurt, a gevred gant Fañchig.

TREDE PENNAD

AR SKOULM EN NEUDENN DORRET

Eur vintinvez a viz ebrel e oa. Ar koug a gane e beg eun evlec'henn, ar piged a brielle o neizioù etouez ar bodennou spenn, ar mouilc'hi a zute hag ar bondriski a gane war lez ar c'hoajou-med...

Eur c'houeriad yaouank, tres eur beajour warnañ, a yae dre eur wenojenn gorigellus, karget a c'houez-vat gant ar bleuniou-hañv, etrezek poull kanna ar Wazwenn, e lec'h m'oa bet divizet etrezañ hag e vestrezig ober eun emweladenn.

Trouz ar golvizier o lopa war an dilhajoù ken na zaone ha teodoù flour ar merc'hedou o vont en dro gwasoc'h

eget eun toullad milinou-paper, a zas-kiltre en eun doare sebezus ouz. pannenou roc'hus an draonienn.

N'oa ket ar baleer-mañ eur zellataer anezañ, tra ! Evelkent e roas eun taol lagad en ti-kanna araok mont ebarz. Ha diskuliet gant e zaoulagad an hini a glaske gwelet, setu ar paotr a lavaret yao er c'hanndi, hag e lavaras :

« Demat deoc'h, merc'hed ! Hag a nevez ganeoc'h er vintinvez-mañ ?

— Demat dit ive, Fañchig ! Netra a nevez ; nemet traoù koz da zibuna dit, eme unan eus ar c'hannerezed, endra ma c'hoarze kreñv ar re all.

— Edomp hor pemp amañ ouz da c'hortoz, va faotr, eme Soaz ar Balbouz, en eur lakaat eur brizenn en he fri fronellek.

War-ze e savas Soazig Maner-ar-C'hoad diwar he boest-kanna, hag eur mousc'hoarz o tarza war he muzell livrin, e lavaras :

« Degemeret am eus da baperenn en derc'hent-dec'h, Fañchig ; hag evel m'emañ hirio devez ar poull, e kavis tro da zont amañ, evel am eus lavaret dit dre baperenn ivez : va c'hoarezed a reas, o zeir, an neuz da c'hoari da fall, ha me, d'am zro, am eus c'hoariet eun dro gamm d'am mamm. Ahont, sell, e kichen tan ar vugadenn, e vezimp brao o kenbrezeg ; eno e vezimp e diogel, gant ma chomo mut war-ze an teir blac'h yaouank a zo amañ... Hag ar wreg-mañ a jomo peoc'h ive gant he genou, neketa Soaz ?

— Ya, ya ! bugale, bezit dinec'h ! a respontas ar wreg ; me n'oun ket eur ridell doull, nag er gêr, nag er vourc'h, nag er poull, ha ne doun ! Roud va zeod-me ne vez ket klevet e nep lec'h, eo ?

— Tra ! Nemet flemmi ha kontammi hepken eo a ra ! » eme Soazig enni he unan.

Fañchig a lakeas neuze eur pezh loeiz aour a ugent lur e dorn Soaz hag a lavaras dezi :

« Dalit, Soaz ! Teir gwech muioc'h eget hennez ho pezo diganen abenn eun tachad amañ... Ya ! Mar gouezit prenna ha dibrenna ho kennou e poent hag en amzer. Intent ha kompren a rit-hu ar ster eus va gourc'hemennou, maouez vat ?

— Mat-tre, va faotr ! emezi, en eur darcha gant kil he dorn dehou ar c'hiltenn vutun diveret diouz he fri war he elgez varvek.

— Tonkit amañ, Soaz ! eme ar paotr yaouank en eur astenn e vrec'h, hag o kinnig paly e zorn dehou.

— A-unan ganez, eme ar wreg, en eur skei gant he dorn digor e dorn

astennet he c'henoberour.

— Mil drugarez deoc'h, Soaz, eme Fañchig, endra ma 'z ae da gaout e zousig, d'ar penn all eus ar c'hanndi.

— Ha bennoz Doue dit, Fañchig ! Te a zellez kaout chafis hag hoal vat, sell !

— E keñver an delidou e vez ar c'haoudou, maouez », eme Fañchig, a ziabell.

Ar gannerez c'hroñjek a beurdorchas he fri fronellek gant tu eneb he zavañjer, a gasas ar pezh aour da draoñ he godell gleiz ; hag o veza lakaet eur meutad a vutun malet en he fronellou-podez, e krogas da sribouilha dilhajoù he c'hannadenn.

Soaz ar Balbouz a oa devezouriezh paour anezi, paour-ran, ker paour hag eur raz-iliz, bec'h dezi o kaout he zammig bara, daoust penaos bennak ez oa mat hag aketus da labourat. Gwir eo n'oa ket bet er skol gant ar verienenn. Hag ouspenn, siouaz dezi, e c'hoarje ganti evel ma ra gant meur a hini all hag a oa war an hevelep micher ganti : karet a rae he bannachig ! Ha gwasas pezh 'zo, pa veze ganti eur strinkadennig hini melen dindan he fri, ez ae he zeod en dro ker gwaz hag eur gornigell gounnaret, o kaout peg en hemañ hag en hounnez. E berr gomzou, eun teod a dri flemm... ha ne oa ket e berc'henn evitañ, pa veze lakaet lusk ennañ.

Hag ar c'heleier, gwir pe c'haou, a nije-dinije, dre ar wiler (1), ar vourc'h hag ar ploue (2) : unan hag unan, daou ha daou ha tri ha tri. Arabat beza souezet eta ma ne oa kelaouenn ebet er c'hornad bro-ze. Evit gwir, da ober peseurt hag evit petra mont da forani gwenneien, pegwir e oa ar gazetennou evit netra ha tud d'o lenn deoc'h evit eun hollvad war ar marc'had !

Evelkent ar pezh aour he doa nevez bet ar gouezier, ha dreist-holl ar peziou all he defe diwezatoc'h, war lavar Fañchig, a zalc'hfe serret-kloz he genou epad eun tachad brao a amzer, rak Soaz a oa gwelloc'h ganti klevet trouz arc'hant en he godell eget santout c'houez vat o nijal war askell an avel !

(Da genderc'hel.)

AB-SULIO.

(1) Gwiler : plasenn eur bourk.

(2) Ploue : ar maeziou.

C'HOARIOU

RESPONT DA ZIVINADENNOU (Niv. 17)

1. Koar da brenna war al liziri. —
2. An devez dec'h. — 3. Eur vi : melen
ha gwenn ennañ pa vez fresk ; ma vez
troet e gor, ne deu anezañ nemet eul
labousig.

1	J	O	Z	E	F	S
2	E	A		J	I	L
3	Z	M		I	Z	E
4	U		A	P	I	O
5	Z	E	L	T	O	U
6		R	I		R	O
7	L	E	A	N	E	D

Gerioù Kroaz
al Lagad-du, niv. 17

KLASKIT, E BEILHADENN NEDELEG : DIVINADENNOU

1) Ganen mantili a bep liou, bepred
[ker bihanik,
ez an en aer, war vor ha war zouar.
Tra souezus : d'am c'hein an holl a ra
[flourig,
hag e va fas e skoont, awechou gant
[kounnar. Petra ouñ ?

2) Ezomm bras a vez ac'hanoun.
Evidoun e peder, galvet e vezan ;
Ha daoust da-ze, pa deuan,
An holl a dec'h dirazoun... Petra ouñ ?

3) Me zo koad,
a rikl war goad,
Kloza a ran war eun den beo
a vez heñvel ouz unan maro... Petra
[ouñ ?

1							
2							
3							
4							
5							
6							
7							
8							

GERIOU-KROAZ AL LAGAD-DU EVIT NEDELEG (niv. 18)

A-blaen :

1. Kêrig vrudet.
2. Tomma 'reas ar Mabig Jezuz.
3. E penn-kenta kals anioù parrez ;
Eun hanter babouz.
4. Kensonennoù eus « Toennet ». Impli-
jet evit debri ar zoubenn.
5. Kentger (préfixe). Unan eus profou
ar Vajed.
6. Breiziz o defe gelllet kinnik ar prof
melen-mañ.
7. Kanerien flour Noz-Nedeleg.
8. Amzer da zont « Rei ». Ger-mell (ar-
ticle).

A-zeñs :

1. Unan eus ar Vajed.
2. Eur prof all, degaset da Jezuz. Eus
« beza ».
3. Evelse e vo hent ar Werc'hez betek
Betleem. Kuzul.
4. Diou gensonenn eus « Levenez ». Ger
implijet da echui kals pedennoù en
iliz.
5. Tost da vervel da vare Nedeleg.
6. Amzer-vremañ er verb « beza ».
7. Jezuz a vo hini an holl da fin ar
bed.

AL LIAMM

kelaouenn lennegel

Un niverenn 80 pagenn bep daou viz

Koumanant evit 6 niverenn : 600 lur

Sekretour : P. LE BIHAN, 1, Avenue Marceau
TRAPPES (Seine-et-Oise) — C. C. P. 5349-06 Paris

EMPLACEMENT RÉSERVÉ
AUX ÉTABLISSEMENTS

HALPER & C^{ie}

BORDEAUX

BEAUNE

(VINS FINS)

TECHNIC - RADIO

ETABLISSEMENTS MICHEL CARIOU

15, Rue J.-J. Rousseau - PONT L'ABBÉ

Toute la Radio

Téléphone 114

Chapellerie JEAN LE DREZEN

Rue Jean-Jacques Rousseau, PONT-L'ABBÉ

GANTS • CRAVATES • BAS • NOUVEAUTÉS

Dans un cadre agréable...

Une table de choix...

Une cave renommée...

Restaurant GIRAudeau

(BAR PARISIEN)

13, Rue Jean-Jaurès, QUIMPER
Brezoneg en ti

QUIMPER **FAIENCERIE** **HENRIOT** QUIMPER



TOUTES CARROSSERIES
INDUSTRIELLES & COMMERCIALES
"Métallique et Alliage Léger"

T U A L

TREDION
MORBIHAN)

TÉLÉPHONE : 6

"A SAINT JOSEPH"

325, Rue Léon-Gambetta. — LILLE (Nord)

J. GORRISSEN, Tailleur diplômé

Toutes spécialités pour *M. les Ecclésiastiques*

SOUTANES, PÉLERINES, MANTEAUX ROMAINS, etc...

BAS pure laine très solides : 350 francs

TRAVAIL SOIGNÉ — PRIX MODÉRÉS

ÉTABLISSEMENTS

Pierre CHANCERELLE

Conserves Alimentaires

(4 USINES EN BRETAGNE)

SIÈGE SOCIAL : QUIMPER

DÉCORATION, LITERIE, TISSUS D'AMEUBLEMENT

A. POUCH et Fils TAPISSIERS
DÉCORATEURS

17, Rue Sainte-Thérèse, QUIMPER — Téléphone 11-60

KIRRI-TAN AR C'HREIZKÊR
LAGADIEC - RIOU
SERVIJ AKETUS ETRE ROSGO HA BREST
BEAJOU - EUREJOU

KASTELL-PAOL

POUR vos REMORQUES pour TRACTEURS
et ESSIEUX AGRAIRES
en tous Genres Fabriqués en nos Ateliers

Adressez-vous à la Maison

LE JOLY & FILS

44, Rue du Pont-Neuf - SAINT-POL-DE-LÉON - Tél. 55

PNEUS NEUFS ET RÉPARATIONS

Augustin LAURENT
KASTELL-PAOL

A c'hell kas da bep lec'h :
Holl frouezou an douar - Frouez prim - Kaol bleunv
Artichad - Ognon - Avalou-douar
(da hada kouls ha da zebri)
Kolo - Ludu

Tel. 134

POMMES de TERRE en GROS
Spécialités pour semences
CHOUX-FLEURS, ARTICHAUTS & FRUITS

Téléphone 2-33 (jour et nuit)
Boîte Postale : 61

H. CAMBERLEIN & Cie
S. A. R. L. au capital de 200.000 francs
EXPÉDITEURS

SAINT-POL-DE-LÉON (Finistère)
Annexe : PAIMPOL - Téléphone 2-10

FORGE - CHARRONNAGE
MACHINES AGRICOLES

Jean-Marie RIOU

49-52, Rue du Pont-Neuf

SAINT-POL-DE-LÉON (Finistère)

CARROSSERIE EN TOUS GENRES

KOADACHOU EVIT AN TIEZ
ARREBEURIOU WAR C'HOULENN - ARREBEURIOU-SKOL

S. CELTON

23 ha 25, Straed Rozière - KASTELL-PAOL
Tel. 250

GWERZ AN AZVENT


Stirps Jesse




Ka nomp, ka nomp an Az veni, Am-zer leun a zousle



Hag a zi-gor deomp ni do-ro-jou ar sklerder



Gant ar Werc'hez ben-ni-get a beg hol le-ve-nez gor-to



zomp gouel Ne-de leg deiz hor zil-vi-di-gez

I

Kanomp, kanomp an Azvent, amzer leun a zouster,
hag a zigor deomp-ni dorojou ar sklerder.
Gant ar Werc'hez benniget, abeg hol levenez,
gortozomp gouel Nedeleg, deiz hor Zilvidigez.

II

A-bell, en deñvalijenn oa azezet ar bed :
Adalek ar penn kenta, Adam en doa pec'het.
Rak-se an Neñv oa serret ; ha 'vit hon torfejou
neuze ne veze klevet nemet klemm, hirvoudou.

III

« Degasit 'ta, o Krouer, an Hini a dle dont :
evit hor zilvidigez, re bell emañ o tont. » (Rorate)
Setu aze pedennou ha klemmou an dud keiz,
ar babl hag ar brofeded o c'hedal noz ha deiz.

IV

Eur Profed 'n eus lavaret « e teulo eur Werc'hez,
e roio ganedigez d'eur bugel a lignez,
d'eur Mabig, Fur ha Nerzus, Didius hag Hael (1),
gant eun' ano burzudus, anvet Emmanuel ». (Izaiaz 7/14, 9/5-6.)

V

Ar Werc'hez-se 'zo bremañ merc'hig kaer ha dinamm.
Gwerc'hez ' chomo da viken, koulskoude ' vezo mamm.
Dimezet eo da Jozef, anvet eo Mari ;
N'eus ket e lignez Jesse perlezenn evelti.

VI

Azioc'h d'ar berlezenn gaer eo deut ar Spered-Glan ;
War e vleunienn e repoz — Mab Doue 'zo amañ —
Kerzomp, kerzomp d'E welet o tont e Betleem,
ha gant Jozef ha Mari, e welimp holl e zremm.

B. CHARLEZ,
manac'h Sant-Benead,
Solesmes.

Imprimatur,
Kemper, 27 here 1949,
J. Cotten, vikel-vras.

(1) Hael : brokus kenan.